

Kontadennoù

1. Yum ar c'halvez
2. Fañch ar Gloc'h
3. Ar barne gwinn
4. Ur varvez vat
5. Sant Evardon
6. Drailhemmoù diwezhañ ar Pardon
7. An hini bihan
8. S^t Ewan e-touez e beorien
9. Tro Lom an Arzh
10. Strapadeg Ardou treougi
11. Milin Kerbourneq
12. Mien ar Reder

ROMANTOU, DANVELLOU, KONTADENNOU

=====

=====

Ne saver ket nemeur a wir romantoù e brezhoneg. Lod eus an abegoù a zo displeget er pennad a zeu da heul hemañ. Ne vefe ket hir ar roll, diglok tamm-pe-damm, hogen kentelius, a c'hellfemp sevel eus an doare oberoù-se.

Ar Roc'h Toull gant J. Kerrien, e 1926. An Aotrou Bimbochet e Breizh (e Gwalarn e 1927, e stumm ul levr e 1927, advoulet e 1942), savet gant Roparz Hemon. Staget en deus rener Gwalarn, e 1928, da embann Ar Vugale Fall, anet diechu. Itron Varia Garmez gant Youenn Drezen, e 1941. Hervelina Geraouell gant Abeozen, e 1943. En ur rambreal, gant Y.V. Kerwerc'hez, e 1943. Enez ar Rod gant Langleiz, e 1949. (Edod avat, ouzh e voulañ e 1944.) Evit Ket ha Netra gant Abherri (R. ar Mason), e 1951. An Teirgwern Pembroke gant Jarl Priel, e 1959.

Ha pa vefe daougementet ar roll-se e chomfe anat evelkent ne deo ket hor skrivagnerien saverien romantoù. Douget int kentoc'h d'an danevelloù pe gontadennoù : traoù war batrom ar marvailhoù pobl, traoù a c'hiz bremañ. Kalz diaesoc'h e vefe sevel ur roll eus an oberennoù-mañ hag eus o oberourien.

En dibab a roomp amañ, ne vo ket kavet ar re wellañ, kentoc'h ar re aesañ da embann dre ma n'int ket re hir evit al lec'h a c'hellomp reiñ dezho. N'en deus ket fellet dimp distagañ un darn nag eus ur romant nag eus un danevell vras, na lakaat amañ unan eus kontadennoù brudet Geotenn ar Werc'hez adembannet e 1957. Dastumadoù a vez embannet a vare da vare dindan anv an danevell gentañ. Menegomp da skouer : Dremm an Ankou gant Abeozen e 1942; Kleier Eured gant Roparz Hemon e 1943; Ar Fest-Noz gant Youenn Olier e 1960.

Mar ne dint ket niverusoc'h eo hepken dre m'eo re verr bepred an arc'hant gant an embannerien ha re zister niver al lennerien. Skignet e vez ar c'hontadennoù er c'helaouennoù ha kalz diaesoc'h eo mont d'o c'hilask eno a-benn un nebeut bloavezhioù.

NOTENN

=====

Nemet evit un nebeut barzhoniezhoù ne zeu ket an dibab-mañ tostoc'h ouzomp eget 1945. Da lavaret eo ez eus danvez da sevel ur bedervet lodenn gant an oberennoù embannet e-pad ar pemzek vloaz diwezhañ.

*

AR ROMANT HAG AN DANEVELL

Skrivañ ur romant a zo hir. Mar deo da vihanañ ur gwir romant evel na weler mui anezho e nep yezh. Ar Roc'h Toull J. Kerrien, hag An Aotrou Bimbochet e Breizh, an daou romant n'eus nemet (1925-1930), a zo romantoù berr, hogos danevelloù. Un druez eo n'en defe ket kendalc'het Kerrien : en hent-se e oa donezonet ar gwellañ. Berzh An Aotrou Bimbochet a ziskouez paseurt lennegazh a gav an aesañ degemer gent al lennerien a-vremañ. Troet o spered draist-holl ouzh an amzer-da-zont, o flijadur a gavont en ur romant a dremen en amzer-da-zont, evel m'o dije kavet o flijadur, kant vloaz 'zo, en ur romant o tremen en amzer-gwechall. An Aotrou Bimbochet a zo bet an oberenn gentañ o sunañ he sapr rag-eeun diouzh an Emsav-Breizhek, kentañ adskoud an dihun broadel e melezhour al lennegezh. Ar Vugale Fall a zo muioc'h c'hoazh stag ouzh kig ha gwad an Emsav, o vezañ n'eo nemet istor romantast ar rumad tud yaouank a groues hag a heulias er bloavezhioù kentañ strollad an emrenerien. N'eo ket embannet c'hoazh al levr avat. Hirc'h a c'halle bezañ lavaret diwar e benn.

En danevelloù eo o deus displeget ar gwellañ hor skrivagnerien yaouank o ijin hag o stummoù-spered disheñvel. Un danevell a vez skrivet buan, lennet buan, aes da embann. Tri abeg d'an danevelloù da ziweañ stank en hor yezh, keit ha me vo ar skrivagnerien tud paour, o skrivañ war-lerc'h o devezh-labour, skuizh ha berr-awenet, evit tud a lenno, ken skuizh hag ec'hub o spered hag i (...)

(X., Pemp bloavezh e Lennegezh Vreizh (1925-1930),
e Gwelarn, niv. 21, 1930)

YUN AR C'HALVEZ

(Istor..., p. 145)

P'en em gavas ar c'hemenner ar vintivezh-se ez Gêrnevez, edo ar wreg oc'h azzañ lein. Lakaat he devoa krampouez sec'h e-barzh ar skudilli ha aoubenn da dannañ war an tan.

- Salud deoc'h, Gaid, eme ar c'hemenner, sichant-tre dezhañ, an ur zont dreist an treuzoù.

- A ! Damat deoc'h, Yann, a respontas ar wreg yaouank, n'emeoc'h ket diwezhat o tont d'ho tevezh hiriv. Ha kouezhat oc'h bet eus ho kwela 'ta p'emeoc'h war sav d'en eur-mañ ?

Klaek a reas paotr e nadoz treiñ ar goaz, rak ne blije ket kalz dezhañ farseerezh Gaid, E gwirionez, evel ez gemenerien all, e oa un den diégus, stav o tere'hel a-dreñv, hag allasoc'h eget d'e dro da ziwzehañ o vont d'e zuvezh.

- Sell 'ta, emezhañ, en ur sellout ouzh ar peder skudell e oa war an daol-voued, ne vin ket va-unan o tevezhiañ er gêr-mañ hiriv 'm eus aon ? Pa zeuan davedoc'h, na welan peuzvuiañ nemet toir skudell war an daol : hoc'h hini, hini Tin ho kwaz ha va hini-me. Petra 'zo a nevez emañ hiriv 'ta ?

Nevez-dimezet e oa Tin ha Gaid. N'o devoa ket bugale c'hoazh hag o-unan e labourant o ziegezh hap kaout ezhomm eus maval na matezh ebet, rak ne oa ket bres o stant.

- Herve an Ti-Swann, e lavaras Gaid, a zo bet gouennet geneomp da zont d'ober ur c'hastell-karr nevez ha lavaret en deus e vije deut hiriv. E skudell eo an hini a zo aze war an daol e-kichen hor re-ni.

Un diaoul a zen e oa ar c'hemenner ha natur fall a oa ennañ. Pa c'helle ober droug n'eo ket vad a rae. Duzhpenn, kesoni en devoa kemeret ouzh ar c'halvez, n'ouzon ket war zigorez petra.

A-hand-all, yaouank e oa Gaid ha nebeut a skiant-prenet dezhi. Na oa bet, pe oa plac'h yaouank, e breuziezh Bugale Mari, n'he devoa ket kavet c'hoazh an tu da vont e breuziezh Sant Tenez, rak kan kredik e oa ha Yann Seitek e-unan.⁽¹⁾

- Paour kaezh merc'h, eme ar c'hemenner d'ar wreg, ne dalv ket ar boen deoc'h azzañ e lein da Herve an Ti-Swann. N'ouzoec'h ket 'ta emañ goul Sant Jozef a-benn marc'hoazh. Dere'hent ar goul-se a ra er gilvizien yun ha vijil hag Herve a zo boazet da heuilh strizh al lazenn-se.

- Fai 'vat, a lavaras Gaid, ne ouian ket an dra-se. Hag hi da denañ skudell Herve diwar an daol.

(1) Yann Seitek ez c'hontadennoù pobl a zo ur paotr mat, sur, nemet ne deo ket fin-fin. Aes eo da lakaat da grediñ n'eus forzh petra.

Ur pennad goude a tegouezhas Herve e kêr. E-lec'h mont d'an ti e yaos, evel kustum, d'ober ur c'hroquad labour d'ar c'harrdi da c'hortoz mare lein. Peuzvuiañ ne veze ket dav dezhañ deport pell-bras. Dont a rae an azzañ pe ar wreg da lavarout dezhañ e veze ar pred war an daol.

En deiz-se, avat, kear en devoa gedal, ne zeuas den war e dro hag e rankes ober bouzellenn voen e-pad ar mintin. Un tammig kas a oa ennañ ha dizamant e lops gent a vailh war er gizell evit ober trouz ha reiñ da c'houzout da dud an ti, en doare-se, edo oc'h ober kofig moan.

War-dro unnek eur e teuas ar wreg d'ar c'harrdi.

- Un tamm rubanoù ha skolpoù am eus ezhomm, emezi, da boazet marenn,

- Sell 'ta, a respontas Herve, abaoe pa da vare eo deut ar c'hiz er gêr-mañ da boazet marenn erek azzañ lein ?

- Lein hon eus debret pell 'zo, eme C'haid, ha penaos d'ar c'hemenner em bije lakaet oc'hanoc'h marteze d'ober ur pec'had. Lakaet em boa ur skudellad voued evidoc'h war an daol, met Yann ar Vesken en deus bet skiant a-walc'h da zigae din de soñj e rank ar gilvizien ober yun ha vijil dere'hent goul Sant Jozef.

Herve, pa glevas kement-se, a chomes e c'henou war nav eur. Duzhpenn souezhat e oa gant tro-gamm ar c'hemenner. Droug ruz a yaos ennañ, met gant aon e vije graet goep outañ e kavas gwelloc'h kuzhat war e gounnar.

- A ! Yann a zo deut d'ober un devezh gwiziat deoc'h hiriv ? eme ar C'halvez. Mat, mat... O ! un den a-zoare eo Yann, avat, daoust d'an holl draoù diot a ganter diwar e benn.

- Traoù diot ? a c'houlennas Gaid, savet he skouarn ganti.

- Ya, diotachoù, kaozioù gwazc'hidi. An dud o deus teodoù fall, paour kaezh merc'h.

- Ha petra 'ta a leverer diwar-benn Yann ?

- O ! nebeut a dra, nebeut a dra... Un tammig eo trest da vont d'ar marc'hed, c'hwil 'oar.

- Chê ! n'em boa ket klavet komant-se c'hoazh. Ne dalv ket ar boen kaout fizieñs e-barzh lod eus an dud memes tra ! Fai ! brav emeon ganti avat ! N'eus nemedon an ti gant ar pemoc'h-se. Tin a zo oc'h sret douar e-valob-douar er Saouleg-Kerc'h. Petra 'zin mar teu ar c'hemenner-laou-se da glask afer ouzhiñ ?

- O ! eme ar c'halvez, n'ho po nemet bezañ war evezh outañ. War an eus klavet n'eo ket diaes gouzout pe da vare e teu e gulad dezhañ. Pa weloc'h ar c'hemenner o lammat ganti e zent ouzh e neud hag o strilhañ e benn, neuze a vo pent deoc'h diwall. N'ho po nemet bannañ ur geuneudenn ouzh e benn ha korkeat e walloz dezhañ.

Mont a reas Gaid d'an ti gant he zavañcherad rubanoù ha skolpoù. E-ser meskañ he chidhouarnad yod kerc'h e taole a-gorn eslioù truilhennek ouzh ar c'hemenar. Hemañ e oa e kreiz an daol-vouad o pledorenniñ war e dorcheñn. Mont a rae lijer e nadoz en-dro ha war e vuzell danav e pare ur mousc'hoarzh trenk ha goupuñs. C'hoarzh en devoas an "troad-leue" d'ar c'halvez brev ha kempenn, ha kement-se a rae dezhañ bezañ laouen evel un eostig.

- Felloc'h 'zo deuet naon da Harve, emezañ. Me 'zo sur ne chomo ket ar pouloud bremaik e toull e c'houzoug.

Hag a-ser lavarout ar c'houzoug-se - hifgn, hañgn ! - e lamme gant e zent ouzh e neudenn o klaek he zrouc'hañ an tostañ 'r gwellañ d'ar mezher. Un neudenn vat a oa gantañ en e nadoz pe, merteze, e oa loskaet o zent en e c'henou. Ne voe ket evit trouc'hañ an tomm neud en taol kantañ. Hag hañ, neuze, hep diskregiñ dioutañ, da strilhañ e benn en ur charoñsaff e zant. Met Gaid o oa war evazh.

« ! pitaouez, emezi d'ar c'hemenar, 'mañ ho kulad o tont deoc'h ? C'hwï, ken nebeut, ne chomo ket ar pouloud da waskañ war ho kalon ! Gortozit ma vezoc'h dizonet diouzh ho tech fall !

Hag hi o tistagañ ur mell taol krog-yod dezhañ a bag o viz ken na strinke ar yod tomm a bep tu.

- Forzh va buhez ! forzh va buhez ! a hope ar paour kaezh kementar. Houmañ eo kollet he ekiant-vat ganti !

Hag e tillemes diwar an daol da glask tannañ ar c'hrog-yod digont ar wrog.
- Tourc'h kozh ! emezi, n'hoc'h eus ket bet a-walc'h ? Setu emañ un tomm all evidoc'h !

Hag an taolioù a gouezhe dizement war choug Yann ar Veskenn.

Hemañ, a c'hellit krediñ, ne chomas ket da gozhañ en ti. Ne voe ket pell o pekañ hed e c'har hag o skarzhañ er-maez. Treuziñ e reas ar porzh d'ar daou-lammruz, Gaid o tont war e lezoc'h gant he c'hrog-yod.

Pe ynjont e-biou d'ar c'horridi e teuss ar c'halvez da hopal d'ar wrog :
- Hep, Gaid ! emezañ o c'hoarzhin e walc'h, ma renk ar gilvizien ober yun d'ar c'hent gwal Sant Jozef, n'eo ket dav dezho, evelato, dibriñ yod losket a'ho marenn. Arabat deoc'h leuskel ar yod da grediñnañ ze !

(Arvor, niv. 55, 1942)

FANCH AR GIOC'H

Fañch ar Gioc'h a oa o chom ar Frankezig, e parrez Lokevred, war gribenn Menez Arre, a-kichen an Dorajoù. E tu ar sav-heol ne weler nemet lannear ha brug ha reier; pa sallor ouzh tu ar c'huzh-heol, avat, e weler doueroù pinvidik hag un dremmel kaez-meurbet, gant ar gwez frouezh laun a vokidi en nevez-amzer hag an eostoù er parkoù diniver.

Fañch, ur paotr treut ha sac'h evel ur gioc'h, a oa krafer eus e vicher; bap lun vintin e veze gwelst o tiakenn eus e glad gant ur sac'h ouzh e gostez da lakaat e vinaouedoù, ur pekad diagleviserioù kozh dindan e gazei, ur vazh penn-kamm en dorn all. Gwisket oa e giz ar vro, da lavarout eo ur chupenn groc'hen dafvad war e choug gant ar gloan en diavaez, ur bragoù berr e lien gros ar vro, - n'ouzon ket hag ef e veze gwalc'het morse, - dalc'het en nec'h gant ur pezh ibil beuz; ur bodroù lez hag ur betoù koad gant un torchad mat a bieu enno.

« ! lunvezh ma komzan deoc'h anezhañ, a-boan ma oa deuet eus e di ma'z eus da welout al laseoù en devoas stignet e-pad an noz. Ur c'hozh konikl a oa an unan eus al laseoù. Lakaet e voe al loenig er sac'h e-touez ar vinaouedoù ha kant tra all. "Evit hemañ, emezañ, em bo arc'hant va lein e Bresparr; en aforv e werzhaf edo, rak en deiz-se e vez marc'had er gêr-se.

Mont a reas war du ar Run Du, e lec'h ma klevas ur yer o kanañ e-touez ar reier bras. "Gounezet he devezh ganti, emichañs", ha Fañch war-du ar gnezrez. Ne voe ket pell o kavout an dozvadonn : buan-ha-buan e hastas da lakaat ar vied er sac'h gant e gonikl e-touez ar vinaouedoù ha mil dra all, hep kemer ar boan d'ober er gont anezho; hag ef hag ober an dro vras da dramen e-biou kêr gant eon bezañ gwelst gant unan bennak.

Tonton Gregor, o tont eus penn e vern plouz, p'her gwelas o treuziñ ar warrenn gant kement a bres, en em c'houlennas petra oa war-lezoc'h ar c'hraier, rak hemañ a oa boezet da zont an ti da lakaat an tan war e vutun ha d'ober ur pennad marvailhat an ur gemer ur skudellad sistr.

E-pad an amzer-se ez ae Fañch gant kolz e dizh war-du Bresparr, e lec'h ma vez marc'had d'al lun, en ur gaozeal outañ e-unan : "Hiziv, emezañ, e zin un devezh mat, rak Doue a zo a-du ganin." En holl geriadennoù ma tremene drezo eo chomet subezet an dud ouzh e welout; a-boan ma tigore e c'henou da lavarout "ye" pa veze goullennet outañ ha pres oa warnañ. Lod a lavars edo o vont da glask an amigez, nemet evit piv ? rak dizemere a oa.

En em gavet e Bresparr a tegouezhas gant Soaz ar Vi, marc'hadourez vied e Komana; setu ma kinnigas e varc'hadourezh dezhi. Pa voe digoret ar sac'h a oa torret al lodenn vrasañ eus ar vied hag ar paour kaezh konikl a oa bet lakaat

en ur stad divalav gant melen er vioù e tivereñ dioutañ. Ar vioù dibistig a oa ivez er memes stad. Evit mirout na vije stlebezet he marc'hadourezh dezhi, e-lec'h teurel ar vioù dibistig-se er baner e voant kontat da Fañch war e zivrec'h; ha bremañ ma oa rot ober ar priz e kinnigas Soaz ur priz izel abalamour ma oa lous ar marc'hadourezh.

Nemet Fañch, tostadenn ha pannaek, ne rebata tanfoaltr gwenneg. Ket skuizh o chipotal hag o welout an niver a dud en em zastumet en-dro dezhi, e c'houlennas Soaz ur wech adarre : "Reiñ a ri anazho ?" Ar respont a voe "Nann". "Ma, neuze peotr, e rei anezho evit netra", a lavaras-hi en ur dennañ an ibil beuz a oa o tere'hel e vragoù an nec'h. Kerkent e kouezhas ar bragoù a-blad war e votoù, ha sttu lostenn o roched o vont en sur gant an aval. Ar paour kaezh krafer a selle en-dro dezhañ gant ar vioù war e zivrec'h o c'hortoz unan bennak d'hen disammañ evit gallout sevel e vragoù. "Gortoz, eme Soaz ar Vi, ma 'ya da zisammañ ac'hanout", ha kemer ar vioù hini hag hini da stlepel dezhañ ouzh e ziadrefn, ma rankas ar paour kaezh Fañch lezel ar peurrest eus ar vioù a chome gantañ war e zivrec'h da gouszhañ d'an douar, evit sevel e vragoù ha klask un ibil all. Hag an holl ha c'hoarzhin en ur lavarout : "Ar ches a gavo an alumann vioù-se da lipat n'o devo ket ezhomm e fourchetuzioù evit hen debrifñ."

"Gwelout a ran, eme Fañch, n'eo ket Doue a oa a-du genin, nemet an diaoul a oa o c'hoari troioù lous din, hag ouzhpenn, war a welan, gant an traoù learet ez eus nebeud a c'hounadigezh."

(Arvor, niv. 160, 1944; Sell. Istor..., p.142)

*

AR BANNE GWIN

(Istor..., p. 118)

Skleur lous tarzh an deiz emgann a zispak d'ar selloù un douar torgennek dic'hlasvez, hep na gwezenn na bod bev. Strobot eo pep pantann gant drain dir a-isplih ouzh postoù o kostezif a-us d'an toulloù gerv stok-ouzh-stok.

Sede ma tibouk diouzh ar c'hevioù soudarded gwisket ha tokarnet glas. C'hoarzhin sioul a reont hag en em ronkañ divall, harnezet-holl. Bremaik e kanent kan dibreder ha tra, trelatet o empenn diwar an hanter-kartad gwin-ardant drammet, dinaouet dezho areak mont d'an drailh. Ur barrad tennoù kanol o tarzhañ tostik-tost en deus lakaet ar ganerien da steuziañ evel konklad en o ribouloù.

Emañ arvu koulz an arsaillhadeg. Tarzh ar c'henoliadeg a zo kan iskis ma ne ziforc'h mui ar skouarn en oeil stredkadenn diouzh eben. Pep strollad en deus kemeret e lec'h. N'ouzer dare hag en abeg d'ar vogidell pe da uloc'h ar ganoliadeg eo en deus ar beure kemant a boan o splannaet. Ne gresk tamm ebet an deiz. Petra 'vern ? Dizale ne welo nemet re sklaer an ankou bleniet gant ijin an dud.

Loc'het eo an argadourien : tannadeg-ruilh ar seizh pemp oc'h ogadid an o raok, e trouzont an draonienn d'ar red. Erwan, e larn arouezier ouzh e skoaz, e vaionetez ouzh beg e fuzuilh, a gerzh buenañ ma c'hall, e-kichen ar pevar arouezier all, da dizhout traoù tor an dorgenn 344, kent ma tirllo tannadeg-harz an enbourien. Re zivrezhat ! Un tarz spontus a-zigor e-harz e draid, ur genou ifern o tisturel krogailh hag houarnaj. Dibradet-krenn, a plav Erwan war e benn d'an douar, ur stok begek o pistigeñ e c'houzoug.

- Graet eo ar stal ganen, a soñj-heñ en ur gouezhañ.

Nann, n'emañ ket c'hoazh en hent etrezek ar bed all. Ne sant na gwad na gouli dinden e vizied. Hag heñ ha sevel ken prim ha tra, e-kreiz ar c'hlemman a glev tro-dro dezhañ, da redek adarre war raok. Krevazhourien a ra dija war dro ar re c'hlozet. N'aus mui nemet daou arouezier en e gichen. Krepeñ a reont ouzh ar run hep ober ken a van ouzh an tarzhadennoù. Sklerijenn an deiz a dreuz gwellec'hik ar vogidell ledet war an argadourien. Ar bataillon kontañ, e renk-adoù skignet rouez en areak, hag, en adrefn, an daou vataillon all, stok-ouzh-stok, renket start, hag e strad an draonienn koabrenn luc'hedennek tannadeg-harz an enebour, stignet en anez. Youc'hadennoù a-zehou. Begadoù soudarded tokarnet plat a ziakenn a-bann-herz, o divrec'h sonnet d'an nec'h : prizonidi o pellaet diouzh an dachenn vrasouac'hus.

///

Sed amañ kentañ lein an dorgenn. Fozioù-difenn diapennet, harnezioù atlepet amañ hag ahont gant ar c'hazh tud a dec'h war du peoc'h ar c'hampoù prizonidi. Pelloc'h ur c'hev o tisonkañ tan, evel genou ur forn o c'horif, hag ofiserien alaman o leskif en don anezhañ. Ne deus ket fellet dezho soublañ d'an daskor.

Ne deo ket c'hoazh tizhet ar pal. War-raok e kerzher stav. Gant sked an heol ez en em skign an emgann en pabl. Strakal a re ar mindreilharezed eus un nijerez d'eben. Sed amañ unan, tangwallek-holl, o kouezhañ a dammoù, an eskell diouz un tu, avel delioù sec'h, hag er stern diouz an tu all. Erwan puchet en un toull, a-harz troad an eil run, a sell, gant euzh ha treuz, ouzh korfoù muturniet, toullgofet, dibennet, saotret-holl a zouez, o weañ, lod anezho, avel buzhug trouc'het, dirak genou ur c'hev. "Ar brezel flour ha drent !"

///

Tizhet eo pel betailhon Erwan. An daou all a gras e-biou dezhañ, tizh warzo, da ziskenn gant pantenn all ar run atrozek harzoù "Samogneux". Hag Erwan ha stagañ a-gevret gant ur soudard all, e vouzannoù rouz, - ur gwir C'herman, war e levezet, kuzhet dindan un anv gall boutin, ma vez graet gantañ, er betailhon, da jubenn, - da zistrediañ gant e bal-hamez unan eus daou c'henou ar c'hev, ma c'hellint kaout repu a-barzh pa zirolo kenoliadeg an eilstourm. Prizonidi, Galloued glozet e ya dibaouez e-biou dezho war-du Torgenn ar Febr. Sed amañ daou Alaman oc'h embroug ur Gall daillet. Sed ahont lod all o stempañ dilla, pennfollet-holl. A-veze da veze un hirienn bannak anezho a vez ledet war an douar noazh gant tarzh trumm un tenn kanol aostrian e gousled ar saonenn. Sedez ha drent eo kalon Erwan en e gsis. Betak-hen en deus c'hwitot an Ankou war e daol, hag, o kreiz palat, eo darbet da Erwan stagañ gant ur genouenn a levneze e yaouankiz gwadek an deiz.

///

Sell ! ur prizonied o tant davetañ, lent-bras, sonn e zivrec'h, liv ar spont war e zremm, o krenañ evel un dañvad dare da vezañ plecuiet gant ar bleiz. Yaouank-flamm eo. Mæblev e zivjed ne doo biskoazh bet astennet.

- Deus amañ ! ta, genouek, ha bez dizaon ! N'ameur ket a soñj d'az tibrin !

.....
- Goulen outañ, eme Erwan ouzh e amezug e vouzannoù rouz, pe pad eo hag a baloc'h e tau.

Chackat a reont etrezo gerioù dianav, Erwan o sallout outo.
- Eus ar c'hles c'hwezok eo...

- Evaldon !

.... Genidik eus Stuttgart.

- Deus amañ, paotr ! Sec'hed ec'h eus, moarvat ?

Hag hep gortoz un eilgeriadenn, eveljust, Erwan a dap krog en a gart soudard, hag en daou litrad gwinn divoulc'h a zo ouzh e gostez, ha dinacuiñ d'ar German ar c'hentañ banne anezhañ.

An den, gwisket e gwez-louet, a stag ouzh an died e zivwez skornillet gant an derzhienn, e sellou damsovezhet o parañ war an anebour medelezhus.

" An neb a roic ul lommig dour d'ur paour em anv..."

Lennet o deus ar c'homzoù-se en tu bennak o-daou, en o yezhoù dishafvel, en amzar ne tarempredent ar c'hatukiz.

Echu gantañ, e taskor ar prizonied ar c'hart, hag e zorn o cham astennet, o kinnig e stardadenn kent kimiadañ. Gwelet mat en deus Erwan ar jestr; troet en deus e benn, avat, evit tremen hep nac'h hen degemer. Ul liv re zishafvel a zo war o dilhad. Enebourien int, war a lavar o blenierien.

- Kemor dilla penn da hent, va faotr. Ne deo ket ksez chom amañ.

Hag ar German kuit, mell warnañ. Treuzet en deus ar saonenn, dibistig, etre div darzhedenn.

- Barrek eo, eme Erwan outañ e-unan, ma ne vez ket lazhet an hent gant unan eus tannoù dall e vradour.

Hag e tap krog en e bal adarre.

(Dremm an Ankou, p. 77, 1942.- Istor...., p.118)

UR VAQUEZ VAT

Kement-se a c'hoarvezas, peogwir an ispiseroz, - a oa en deiz-se, marvat, soñjezonoù all an he fenn - a reas ur fezi bras.

Kas a reas d'an dimezell Mari Klac'h ar pakad a oa bet gouc'hemennet evit an dimezell Mari Doz.

Ar pevarzek a viz Eost a oa.

An dimezell Mari Klac'h a zigoras ar pakad nevez degaset dezhi gant merc'h an ispiseroz. Kavout a reas kartenn he nizez hag en ur sec'hig koant madigoù chokollad, eus ar re a zo traoù kalet e-barzh, a ranker kaout dont start evit o zrouc'haf.

An dimezell Mari Klac'h n'he doa ket a zant. Laveret he doa a-viskoazh ne gere ket ar chokollad. Bez' e oa ur plac'h yaouank kozh hanter-kant vloaz. Pinvidik a oa.

Mari Doz a gevas madigoù sukr blot en he fakad. Hogen se ne sell ket ouzhimp.

*

Div eur goude, pa zeuas nizez an dimezell Mari Klac'h, un torkad blouioù gwenn en he dorn, da walc'h he moereb, kas he devoe sac'haf war ar c'hloc'h, den ne zigoras.

An dimezell Mari, kuzhet e-dreñv stalaf ar gegin, a welas he nizez o pallnet, hag a stardas he muzelloù etre he javedoù dizant.

*

Ne oa ket ar wech kentañ he doa an dimezell Mari da glemm eus he nizez.

Morse ne oa traoù brasoc'h eget an dra-mañ. Netra evidoc'h marteze. Hogen kalz evit ur vaouez n'he doa netra d'ober eus ar mintin betek an noz, hag eus an noz betek ar mintin, nemet soñjal he soñjal he treñf en he fenn ur barn menozioù bihan, atav an hevelap re, hag a yec bepred war drentant gant an oed.

Ar wech-mañ e oa so.

Deskiñ a raje d'he nizez.

*

An nizez a oa dimezet, eürus-meurbet gant he fried hag he daou vugel, ur mab hag ur varc'h.

Pa welas penaos e oa troet he moereb, ne glekas ket kompren, nag en em zigoreziñ.

Deiz ar bloaz a dremenas hag an nizez a chomas pell diouzh dar an dimezell Mari.

Ar varc'h henañ, he filhorez, a reas he fask kentañ a Mazhaven goude. He ne vos kasat na lizher, na skeudenn, na netra d'ar voereb.

Eval-se e-pad tri bloaz. Pep unan diouzh he zu.

*

He setu ma varvas pried an nizez un deiz.

Ar voereb a zaredas da di an hini marv. Beilhañ a reas un noz. Kurzhout a reas e-kichen he nizez e-doug an douaridigezh.

Ha goude echu. Dor an ti a vanas serret evel a-raok.

*

Da zeiz kalonna e teuas ul lizher digent an nizez, ul lizherig keezh, mezhok, truzus. Hetañ a reas d'he moereb ar bloavezh mat, hag ar vugale ivez, ha komz a raent alies anezhi, ha gouzout a rae pegen fall e sant bet hall en he c'hefver, ha pegen madeleuz e oa, ha keuz o doa d'ar pezh o doa graet, ha bec'h o doa o vevañ, he ne chome man eus arc'hant he fried, he kevot he doa ur plas da vont en tiez da glek gwerzhañ gwiererezed, he ne c'houneze ket e-walc'h, he ret e vije tennañ ar vugale eus ar skol, hag he pake d'he moereb gant aneoudegezh-vat ha karantez. Kement-se a oa skrivet an un doare diampart, hag en dije torret kalon ne vern piv, - nemet an dimezell Mari.

E oa e-kichen an tan o lenn al lizher. Kregiñ a rae er pifanotzioù, hag o lakas ar follenn da rostañ, goustadik.

*

E-pad seizh vloaz, ne zeuas ken a gelou eus an nizez.

An dimezell Mari a glevas koulskoude penaos e oa bromañ e Naoned hec'h-unan-penn; ar mab a oa est da coudard a-raok e amzer, ha lazhet e oa bet a Maroko. Evit ar varc'h, ne dalveze mui ar boan komz anezhi.

*

Un deiz, e teuas ul lizher adarre. An nizez e oa klañv-bros hag a c'houlenne skozzell. He bell he doa gortozet da vont da di ar medisin, ha chomet e oa toc'hor da heul un operasion.

An dimezell Mari ne zavas ket al lizher en dro-mañ. Hogen e regif a reas, ar pezh a zo tost heñvel. En doare ma varvas an nizez daou viz goude.

*

Neuze, an dimezell Mari a branas dilhad kafv, hag a lokase korf he nizez da zont en-dro eus Naoned, da vezañ douaret e kav-bez an tiegezh.

Bep bloaz e vez pebet ganti un oferenn evit repoz an ene. Hag hafv-gonfiv ez eus bleunioù kaer war ar boz, hag ez a an dimezell Mari da bedif weznañ bep sul, goude ar gousperoù.

(Kannediq Gwalarn, niv. 6 ; Arvez, niv. 25, 1941)

SANT EVARDON

Aze, e korn an iliz, tofvel, e tu kleiz ar grozenn, ma ne dro moras nezennoù fresk an aberdoez, ma sev eus an darnoù ledan c'hwez ar c'hontvedoù, al leizhded, an douz binniget, an douz gleb, ar c'hoar teuzet, an zafis kozh, ar vered, an dilhad gwasket en armelioù kizellet ar sekristiri, a-rez ar peulioù tev, goustad e toue ar marc'had, skeudoù didrouz en emc'houloù. Ha neuze daou-linañ war ur gador. Difiñv, o pediñ.

Unan, ur wach an amzer, a save he fenn. Ar Sant koad a selle outi gant daoulagad bras-bourbell souezhet. Sant Evarдон. Un askob bihan, harpet war ur vezh hiroc'h egetañ. Dilufr. E viftr dislaouret ken hir, damdost, hag e gorf. Pa lintre an heol e veze soubet e sas dislivet en ur mor glas. E zorn an nac'h o vinnigañ.

Atav e veze bleunioù nevez trouc'het war ar sicheñn dirzeñ, an ur werenn sklaer laun a zour feunteun.

Atav, da zeiz ar pardon, a veze douget gant pevar gwaz, ar re vresañ eus ar barrez, abalanour d'ar marc'had, e dremene hall dinden ar c'hrevezh war leurenn an iliz war-lerc'h ar brosesion.

*

Ar person nevez a erbedas d'ar barrezianiz lenn La Croix du Dimanche. Premañ a reas ur fivveksoudenneroz evit ar patronaj. Difann a reas ouzh ar marc'had tremen dinden krevazh Sant Evarдон.

*

Ar marc'had devot a branas La Croix du Dimanche, hag a lannas hap kompren eus kroc'h an talbenn betek linenn diwezhañ an embannoù : yec'had hon Tad Santal, kelaier ar Mekaig, nijdenn Lindbergh, gant devozion.

An dud a yeas da walout ar fivveksudennoù. Ar brud en doe redet ar vouc'h o dije gwelet Charlie Chaplin. E-lec'h-se e voe diskouezet kutuilhadeg ar c'hofe e Brazil hag Itzon Maria Loretto. Kerseet e voe pep unan.

Pa voe difannet ouzh ar marc'had tremen dinden Sant Evarдон, betek ar re zevotañ e voe droug enno. Ar gwazoc'h kozh a skrighas o dont. Ar plac'had yaouank a vouc'hoarzhias. Ar wazed kozh a c'hrozolias. Ar baotred yaouank a reas gomp. Droug enno.

*

Ur bloaz war-lerc'h, avat, e vas er c'holori bras.

*

Braz e oa koulskoude delwenn Santez "Jeanne d'Arc". Navez-flamm o flammañ. Arc'hantet he hobregon. He zag-houarn ouzh he zroid. He blev trouc'het harvez ar c'hiz. D sellout strizek an Nañv gant daoulagad aspadus, o weskaf start war hec'h eskre fust ar banniel flourdilizot. Eus Paris e oa deut d'ar gwenn. En ur voest prenn gant e-leizh a skolpad hag a baper. He ma vije torret ! Nann, aze edo, naet he luf, harp ouzh ar voger velen kozh, hag an trebez-houarn direzi gant pileroù-koar war enaou. Laeret oa bet an trebez digant Sant Jozeb eviti.

Ne oa ket e werenn evelato, nag a zour feunteun, nag a vleuniou. Aet kuit ar werenn. Lemet ar sichenn a gichen ar prenestrig glas. Aet kuit Sant Evarдон.

*

Pedif a reimp evit hor c'herent hag hor madoberourien...

Nebeut e dud a bedas koulskoude evit ar vadoberourez nevez : an intañvez voan daoulinet war bank an aotrou person, mar plij, e-kichen an ogreou.

Deou vloaz 'zo he doa lakaet sevel ar "villa" du-hont war an tovenn, gant al liorz vras plantet a wez-pih hag a dameriski. Hi he doa roet arc'hant da bremañ ar fivvekdennerez, - torret bramañ. An intañvez aus "Valenciennes". Ne zous eno nemet en heñv. Hi he doa promet delwenn Santez "Jeanne d'Arc". Met e oa gant ar person. En abeg dezhi, ec'h embanne gouelioù ar sizhun e galleg.

*

Pa lennas ar person roll ar pardon, ne lavaras ket anvioù dougerien Sant Evarдон. Pa ziskennas eus ar gador-buzog, Saig Fulup, Biel Vras he Roue Talibar an ur dreñ o c'hadorioù, a lezas anezho da gouzhañ a-ratozh.

*

Doiz ar pardon, d'ar brosesion vras, e vas nebutoc'h a beotred. Tra ma teus ar-maez ar c'hoefoù gwenn dre ar porched evel an arc'h, Saig Fulup, Biel Vras he Roue Talibar a chomes e tavenn an Tri Golven war laouenn an iliz. Melloù beotred pemp vloaz war-nugent. Dougerien Sant Evarдон deou vloaz 'zo. Saig Fulup, atomp gantañ, plantet war dzeuzoù an nor, sanket ruit e zaouarn e

godelloù e vragoù. An deou all a-dreñv o c'hoediat er skeud evel discolod fery.

An holl verc'hed gwidibunan a oa eno. Sentus. Bugale Vari, gwisket kran e giz kêr, o kanañ kantikoù gallek. Un druger salacu. Un druger sellout outo.

*

Hag e tremenas an davazh er peoc'h hag al levezon. Hag e kouezhas an abardez ken sioul ha tra war an iliz. Pa'z eas an aotrou person, hebesk he diankrez d'e wela...

*

A-hed an hentoù kamm hag ar c'herzhentoù, ur mor a dud. Evel merien war al lann oc'h aloubiañ an nor du an tovenn. Merc'hed he beotred. Darn o vont eun direzo, sounn, stardet o muzelloù, stouet war o chapelad. Darn o vransigellat. Darn o kousket, douget gant froud an ogreaz. Darn o sellout met, war o suvezh, eon ganto da strabetiñ ouzh ar mein ha da risklañ war ar geot strewet a garfoù marv an tousegi bihan fruket.

*

E penn ar brosesion, du, a-us linenn an dremmel, kravazh Sant Evarдон, o ruilhañ hag o lamet evel ur vag war ur mor pennfollet, war ziskoz Saig ha Biel he Roue hag un den all dianav.

Evel an amzer gwechall, e reas ar brosesion tre an tovenn.

En ur vont a-hed liorz ar "villa", ar gwerc'hed a zifrennas mouedet diouzh ribl ar wenedenn, ha vlaof ! ouzh moger an intañvez gant padennoù de Sant Evarдон.

Hag e tremenas ar merc'hed, pop unan anezho, dindan ar sant. Da ziwzhañ holl, he peogdir na oa ket a valdenn war o zro, a reas ar pevar douger ur c'hoefad met a blijadur : o c'harren ar c'harvezh, hag ouzh he c'houziañ buen da virout ouzh unan vras e dremen. Ha neuze ec'h abez krog-geuren hag o ziañ lamm d'unan dev. Ho garmoù... kournar... c'hoarioù... pifedeg... c'hoerzh bugale Vari o tasseniñ dreist an tovenn a roc'h de roc'h betek ar c'harrek aonennat-gwenn e-kreiz ar c'hoummed ar pellder.

*

Ar c'hloc'her antronoz a gavas Sant Evardon war e sichenñ an iliz.
 Ha dhlwenn Santez "Jeanne d'Arc" en ur c'hozn e pinienn.
 Aboco e tau oval a-raok ar merc'hed da zeulinañ dirak ar sant.
 A-feur ma tosta doiz ar pardon bras, e kresk strafuilh en antron person.

(Gwalarn, niv. 15, 1926)

DRAILHENNOU DIWEZHAN AR PARDON

An heol o tiskenn a-dizh davet gwerenmeier ar Genkiz a verke o tlas
 bozañ tost da seizh eur hag e oa poent da dud ar pardon tastaat euzh ar gêr.
 A-nebeudoù e kuitas ar vourc'h, hag ar varc'hadourien a grogo da frouzhañ
 o stal. War hent an Arvor, kirri-dre-den a c'halve an dud diwezhat.
 D'ar mare-se, Yann ha Perig, daou baotr seitek vloaz e yeas da gemer
 bep a bakad butun ha da evañ bep a vanna a-raok mont d'ar gêr.

Pa guitajont an osteleri, an heol a oa kuzhet, hag e nije an noz en-
 dro d'ar girzhier. Un tammig e oant badoust, hag o fenn a vouldinelle, un drugar,
 evel ma vije ar c'hlouzioù o kanañ da haul an evnedigoù evit an daou baotr, dre
 ma tremenent, hag ar raned ivez er poull-dour foenneg an Droell-vihan.

Evit lavarout gwir e oa deut ar baotred gwall zrev gent o bonnoù, skañv
 o zroad ha lemm o spered. Sofjit ivez ez oa unan eus ar gwechoù kentañ ma'z
 oant da bardonañ o-unan. Ne oa ket an o soñj ober fall koulskoude. Souzout e
 rit avat patra a c'hoarvez, dreist-holl gant ar baotred o deus tramanet o amzer
 o huñvreal a traoù separ diamen, ar frankiz hag ar pellder.

Mevel Kerzeleneg a oa bet o kerzhad ur c'herrad melchon ur wach deut
 d'ar gêr. Edo o kanañ ur son yaouankiz, hag an daou baotr, an ur pluvout se a
 oa kroget ar c'hoant kanañ enno ivez. Ha setu int da vlejaj ar gencouenn vrudet,
 pe ne ouient hini all.

Ma 'zo bet an ifern 'pad ar miz Gwengolo
'C'h ober e votoù d'an disoul kamm
hag o trous'hoñ de'af e varv.

Sklintinat a rae ar pozioù war ar mezioù maredet, hogen hep ehan e tauo
 ar zandonn :

Ma 'zo bet an ifern 'pad ar miz Gwengolo...

- Ni hor bozo skandal p'an em gevimp ar gêr, va faotr !
- Stank da veg, ha kan un draig all dimp, te 'oar ?
- Netre ! eo gortoz...

Kalz amzer em eus kollet !

- Nann gaat ! ne deu ket ! gortoz 'ta :

'Vit souzpren an durzunell.

- Lez 'ta !

Kalz amzer am eus kolllet o furchal ar c'hoadoù,
Tec'het eo an durzunell ha nijet er c'hoad all.

Dogpouzhet e cant e-tal pont an hent-houarn.

- Ha soñj ac'h aus, Yann gouzh, pegement a "voulê" hor bos, p'edomp er skol, o stlepel mouded war drañ marc'hodourezh peder eur hanter ?
- Ha ma welfemp adarre. Skeñv eo va zroad hiziv, gouzout a rez !
- Eomp !

Hag e savjont war an aspled - ha brallañ war an eil kostez goude agile avit gwelout pelec'h edo ar c'hempouez gwallañ. Aon a groge enno pa deuzvozent diskregiñ ha sachañ o ddaouarn daveto. Tamm-ha-tamm, avat, ec'h hardisoent, evel ma hardisa tamm-ha-tamm ur gaerull vihan a c'hoanto treuziñ an hent.

Int ha mont eus an eil punn d'agile eus an aspled, fouge enno. Mont ha dont a raent evel-se, ken prim ha ken osur ma tafañjont da ziskouez o lavenez. Pell diouto koumoul rotoral ar menozioù balc'h.

War bouez mont, dont, ha trañf ac'h en em gavont fri-ouzh-fri, ha kregiñ an eil o diskoaz agile. C'hoant dezho trañf hep tapout lemm a gen uhel all ? Spered ar warez ouzh o heñchañ goude milvedoù ? Trawalc'h e vev avito avit klouout ar gwad o vorzholiañ o ividiqoù, o c'halon o skeiñ e-brim en o bruched. Red ar gwad a lakoes kerkent o spered da zigorif ouzh er bed dievaez : holl drouzioù an natur voredet-se a redas hed-ha-hed o gwezhied, a silas betek mel o eskezn, ken na chamjont abaf. An doue o sourral en ur gouezhañ diwar reffell ar Gouer Glas, an adreñn o kanañ he disken kefvacous ha dibbouez a koadoù ar Run, ha ches o harzhal hep paeuez a-dreuz boullled an aberdaez a gemeres perzh an o frederioù.

Ma vev troet o soñjoù.

Erruet er penn - tavedek, evel ma vije bet un emglev kuzh etrezo - e chamjont da arvestiñ ouzh an div linennig houarn a red, gwenn-luzus ouzh skleuzioù diwezhañ an deiz. Touellus ha lazhus.

Perig ha lavarout neuze :

- Klav ! n'ouzout ket petra 'm eus hufvrest meur a wech ?

- Nann !

- Setu. Ni a ren emañ ur vuhez c'houlle, goulle, goulle... dont a re da soñj din en ur welout al linenn houarn-se... hufvrest em eus mont evel-se, hep ehan, dieub ha dront, en dianev. Ha labourat neuze diouzh narah va divrac'h evit gounit va zamm kreun, ha mont, mont, gwelout broioù ha traoù dianev, deskif traoù e-leizh hag o c'hontañ dre ma'z in. Gwelout a rez, ni n'omp nemet hanter dud.

- Gouzout a rez koulskoude omp stag. Stag ouzh hon ti, hor c'hâr, hor chatal, stag ouzh ar ro a anavezomp hag a garomp. Stag, stag da viken.

- Ya, stag.

Tavedek a chomont o sellout ouzh al linennou-houarn o tuffvalast hag o steuziñ dre ma vouke ruzder ar c'hornog, eus an hevelep doare ma steuz pep hufvre en o buhez. Kroget eo enno ar c'hoant kantran. Gaiñ a re en o empann, ha birvilhañ, ha trañf ha distrañf. Galv ar pellder, ar broioù dianev ha klouar, an evel dront war ar menozioù...

Ar vuhez dieub, birvidik.

(Gwelenn, niv. 60, p.42, Du 1933)

A N H I N I B I H A N

Hanter-kant bugel am eus, ha teodoù hir dezho. Hogen, kredif a ran ez int holl aelaz vihan diskennet eus an nefv evit va flijadur. Holl ? Anat eo n'eo ket gwir. Kaer am eus klask en hemañ an ael bihan pe vras, - na gavan nemet ul loen drouk evel ki gouez va moereb.

Sed aze ar pezh am eus lavaret n'ouzon pet gwech d'am renerez, e-pad m'eo chomet Perig Abalan em skol.

Perig !

Ur fzi lous gant kleier hir o ruilhañ war e vuzelloù, daoulagad glas louet kuzhet gant blev ruz a-fuilh war e zivjod, bragoù a oa bet du gwechall, - Hogen Perig en doe ruzet e-barzh meur a gleuz kent dont d'ar skol bennez ! - hag un daveñjar re hir, a oa re verr evit e c'hoar henañ.

Perig ! Truez va skol !

Ne felle dezhañ na skrivañ, na lenn, na c'hoari gant ar re all. Un dra hepken a blije dezhañ : ober netra, netra 'vat eo. Rak bennez e teue ar vugale da ziekouez din ur c'haier freuzhet, - ul levr louzet, ha : "Pelec'h emañ va botoù-koad ?" - ha : "Pelec'h emañ va gwestell ?"

- Perig ? Pelec'h emañ ?

Ur mousc'hoarzh evit respont, - ur mousc'hoarzh kerantezus, - netra ken.

Ha pa zeue an eur da lenn !

- Perig, sell ouzh ar vazh am eus graet war an daolenn du. Pesourt lizh-erenn eo ?

Perig e vousec'hoarzh, hag e lavare en ur vousec'hoarzin : a pe b, pe ne vezn petra, nemet i.

Amzer an danevelloù.

Priñsezig an Dour a zeus e-barzh ar sal deñval gant he mignon Laged Tav, hag evit he gwelout gwelloc'h, svezh bras a lounie daoulagad va bugale. Perig, heñ e-unan-penn, a chome dischlant ha meur a wech e veze garmet a-daol-trumm :

- AI ! AI !

Amezsien al lakepod o doe tafvast ur wech c'hoazh an douster da vezañ en e gichen.

Koulskoude, un deiz heoliet (Kredif a ran e laverson an heol...) ur burzhud bras e c'hoarvezas war an douar. Pa sellia ouzh daouarn Perig er mintin, gwalc'hat e oant bet. A-hend-all an hini bihan a oa en e renk pa sonas ar c'hloc'h.

Evit e galoneket e rois dezhañ ur skeudenn livet e gwer : - liv ar goanag savet ennon diouzhtu.

Siwazh ! Dek gwech siwazh !

Freuzhif a reas ar skeudenn kerkent ha roet dezhañ - hag e vee drouk evel morse a-hed an devezh.

Hag en em c'houlennis pegoulz e kavjen hent e galon ? Biken...biken.

Ar yaou a oa lacuen, - tremenet e-kichen va zud.

D'ar gwener pa serruis evit senif ar c'hloc'h, ur paotrig e zeus davedon, gant un neuz c'hloc'haret :

- "Dimezell, ... Perig Abalan, ... ur c'harr-dre-dan... marv eo, o deus

lavaret.

Marv.

Adwelout a ris dremm Perig goloet gant blev ruz, - hag e vousec'hoarzh, ... gloazet e voen.

Biken ne gavin hent e galon.

(Gwalarn, niv. 33, 1931, p. 17.- Jstor..., p. 159)

SANT EWAN E-TOUEZ E BEORIEN

A-raok ar merer a zo bremañ e Kervarzhin, edo o chom eno un den pinvidik a-walc'h, e anv Loeiz ar Yaouank.

E Kervarzhin bep bloaz amañ ar c'hiz santel, en efvor d'ar sant bras a voe ganet eno, da zozañ boued d'ar re baour a zeu da glesk goudor gant pardon Landrager. Ha Loeiz ar Yaouank a zalc'he d'ar c'hiz. Kemeret en devoa ar c'hustum da ober soubenn al laezh d'ar beorien, ha ken niverus e oa ar re a zeus da glesk an aluzon deziz ar pardon, na ranke Loeiz hag e wreg ober ur gasteriad soubenn bep bloaz.

Er bloaz-se, avat, d'an triwac'hvet a viz Mae, da enderv, o oa ken fall an amzer ma lavaras ar merer d'ea bried :

- Ne zaus ket kalz a beorien fetsiz gant an amzer lous-mañ.
- Hani, amezi, ha ne gradon ket a talvezfa ar boan ober kalz a soubenn, beta-gout na vanfe. Gent pemp pe c'hwec'h litrad laezh e vo tra-walc'h.

Ha hi, oc'h ober diouzh se, da gregif gant he labour.

Hogen setu na save an amzer ha ma sklarsas an eabl, a bep ma tostas an abardsez. Hag ar beorien a arrue evel ar bloavezhioù all. Re gama a oa, re voñs, re vut-he-bouzar, re gozh ha na oant ken evit gounit o zomm kroun, hap kar na par war an douar; an tad hag ar mab doll a oa eno ivez : holl kustum dn redak dre Vreizh-Izel eus an ail pardon d'egile war bouez ho flac'hioù hag o hizhiar derv, pe blienet gant o chas. Bez' e oa reoù hag a zaus a-estlej, koulz lavarout; holl "hep ti nag aoz na gwale da gousket an noz", hag anavezet mat e Kervarzhin.

E-mesk ar re gentañ oc'h arzuout an daiz-se e oa un den kozh, kroum gant an ond, gwisket truilhennek, blev gwenn-louet ha hir o kouszhañ war e c'houzoug hag e zivekouarn. Ur c'hozh tog du distum a c'holoe e bann. Ha doust na vanke ket a blas war ar skinvier an-dro d'an daol, ez eas da zezañ war an oaled. Gen n'ansveze anezhañ ha pedal, diskouez a re anavezout doare an ti.

Pa voant un toulled ouzh taol, gwreg ar Yaouank a drampas ar soubenn; zeif a reas e skudellad da bep hini hag ivuz d'ar paour en e goceez war an oaled.

- Bennozh Doue, eme hemañ, ...met, 'm eus son, n'hoac'h eus ket grest kalz e zispign evit ar bloaz. Nabout e zoubenn e walen nza ar pod !
Chom a reas-hi subedennet, sobituet-net. Ha fried a zeus war he sikour :

- Sed amañ, avat, a respontas Loeiz ar Yaouank, ur pezh divergant ! En em emell eus da bemp krampouzhenn ! ha debr pan out servijet ! Hogen e gwirionez e teue ar merer hag e wreg da vezañ nec'het o walc'hegen niverus e talc'he ar beorien da zigouzhout, rak gwerzhet oa bet e Landrager peurrest laezh ar goro enderv.

Evel na oad o tiskenn soubenn da zaou baour nevez-erruet ha na teus tri pe bevar all en ti, ar peotr kozh war an oaled a savas e vouzha adarre, o lavarout dezho :

- Kouis eo deoc'h monet da glesk e lec'h all, e c'hoapaas-heñ, amañ en traut an traoù hiziv.

- Sapre teod ! Te, peotr kozh, eme Loeiz rust a-walc'h dezhañ, pan oc'h eus bet da lod, n'ac'h eus nemet zeif peoc'h bremañ ha lezel ar re-mañ da dostaat !

Kounnezet, Loeiz ar Yaouank hag e wreg a zalc'has da servijet ar beorien o sc'jal en droeg o devoa ouz an den kroum en e goceez war an oaled. A sav-taol, avat, e taoljont evezh e oa ar glaskerien-aluzen ken niverus hag er bloavezhioù all hag an holl o devoa bet o skudellad soubenn al laezh : menel a ree c'hozh eus hemañ er pod, zoken ! Tud Kervarzhin a voe souzhet-bras, hag ar peotr kozh war an oaled a vint'hoarzh en ur zebrif.

Ne lavarjont grik, ken na voe set an holl beorien ar-meez. Da zivezhañ e savas ar rec'hoaner kozh hag e kimiadas dinuto :

- Mat ho poa graet an traoù, e gwir, emzasañ, hag ar gaou a oa ganin bremañ.

Minc'hoarzhin a reas adarre, ha ken dous e teuas ar minc'hoarzh war e vuzelloù na voe fromet Loeiz hag e wreg. Monet a reas kuit ar c'hlesker-bers gant hent ar Vinic'hi en abardsez o tefvalast ha den biskoazh n'e adwalas diwez neuze.

(Istor gwir bet kontet din d'an 18vet a viz Mae 1941. a Parroz)

(Arvor, niv. 28, 13 Gouere 1941.- Sell. Istor..., p.176,197)

T R O L O M A N A R Z

Lom a gemeras hent menez Arre. Alanig a veve du-hont, e-kichen Bras-parz, e Kastell-al-Laer, savet etre tuchenn Sant-Mikael hag ar Yeun-Elez. Hir oa an hent, pell oa mont di.

Lom a gerzhe, lorc'h ennañ ha laouen e galon. Degouzhout a reas e-tal Kastell-al-Laer, ar c'hastell bravef a oa e Breizh-Izel en amzer-se (foeltret eo bet abaoe, ha ne gaver mui en deiz hiziv, e-tal ar Yeun-Elez, liv abet eus an dismantrou). Serret ha prennet e oa an noz.

Lom a hopes :

- En ti emac'h, filhor ? Lom, an Arz, a zo deus d'ho kevout, a-berzh har rous.

Nobl a gemenn deoc'h dont hep dals d'e lez-varn, ha me a zo bet kergist da zegas deoc'h ar c'helou. Deuit eta genin betek ar palez evit rentañ kont eus ho torfedoù, pe evit difenn ho kwirioù. Ma ne zeuit ket, ne vezo nemet gwezh a se evidoc'h. Bazhadoù betek mervel a vezo roet deoc'h marteze ! Filhor, dont a rit genin ?

Alanig en doa klevet prezegenn ar genapoug, eus ar ger kentef betek an hini diwezhañ. Ne respontas ket diouzhtu. Kredit a reas dezhañ oa deus tud all gant Lom, hag e oant kuzhet, marteze tost d'ar c'hastell, a-dreñv ar bodennoù lann. Fignet a reas eta war doenn e gastoll, hag e teulas ur sail war ar park-eier tro-war-dro. Ne oa den kuzhet abet. Lom a oa deus e-unan. Alanig a ziskennas.

- Paeron, emezañ, selud ha prosperite ! N'em eus ket gallt dont da zigeriñ deoc'h diouzhtu. Edon er chapel o lavarout va chapelad. Mat hoc'h eus graet o tont. Deuit tre en ti, mar plij. Gwerz'hez Vari ! Ne pagan tomn eo deoc'h ! N'eus ket ur vaevenn sec'h warnoc'h, ha trouc'het eo hoc'h alen ! Trugarekait ar roue eus va farzh : jentil-kenañ eo bet o tegas davedon va brasañ mignon. Enabourien douet en eus er palez. Bendez e vez lakaet war va c'houstiañs gant an sotrounez-se ur torfad bennak. Dre surved evidon emac'h eno evit difenn va enor. Lavarit d'ar roue e tegouzhin warn'hoazh vintin, rak hiziv on re skuizh evit ober zoken ur pennadig-hant. Ge greisteiz em eus debret traoù hag o deus graet droug din.

- Petra hoc'h eus debret eta, filhor ?

- Se ! deoust ha talvezout a ra er boan displegañ deoc'h perek em eus droug-bouzelloù ?... Abaoe pell 'zo e run pinienn vras. Muic'h a zellid en deus unan pa wesk war e boanioù hep lavarout ger da zen. Hogen peogwir hoc'h

eus c'hoant da c'houzout e lavarint deoc'h n'eo ket ur vuhez eurus hini ur peour kaezh den. Alanig n'eo ket ur markiz, ha, pa deu naon dezhañ, a tebr du-mañ, du-hont, un tammig mel, lipot ar pengosioù darv. Ret eo din debrif ar pezh a govan. Heugif a ran ouzh ar mel, nemet ur sac'h goull ne chom ket en e sav, hag, evit chom bev, eo da din debrif un dra bennak. Koc'hwet on gant va fredad. N'eo ket souezhus ne brofit ket din, pa ne garen ket anezhañ.

- Panoos, filhor ? Petra em eus klevet ? Ne garit ket ar mel, un dra ken mat all ? Ar mel a zo rous ar meuzioù. O ! ma n'oun ket ken figus ha c'hwil. Lavarit din eta pelec'h ez eus mel ha me e dalvezo an dra-se deoc'h, ha me a zento servij deoc'h e pep lec'h, kredit ac'hanon.

- Paeron, arabat ober goap ouzhin !

- O filhor, ne ran ket goap ouzhoc'h, arabat kredit.

- Mat ! eme Alanig. War hent Brasparz, en tu all d'ar menez, ez eus un den o chom, hag e anv Rusteval. Kement a vel en deus ma n'hoac'h eus gwalet morse kemend-all en ho puhez.

Lom a reas al lamm skañvañ ma c'halle ober gant ar blijedur vras a oa ennañ.

- O filhor, emezañ, mont a reomp di diouzhtu ? Mell a zo warnon tofva ar mel, ken mat e kaven anezhañ.

- Deomp 'ta neuze, a lavaras Alanig. Koulskoude eo dises din bale hiziv. Met gant karentez evidoc'h e teuin a-benn d'ober ar pennad-hent-se brav e-walc'h. Petra ne rafet ket evidoc'h ? C'hwil, d'ho tro, e palez ar roue, a vezo va alvocet, ha va enor ha va brud a vezo difennet-kser.

Alanig a gerzhe, ha Lom a heulia anezhañ laouen-ran.

- Mel c'hwero a vezo, a soñje al louarn.

Lom hag Alanig a oa degouzhnet dirak ti Rusteval.

An arz, a vin savet d'al laez, a lavaras :

- O, Alanig ! C'hwet ur mel dispar a zo deus betek va fronelloù !

Hag en ur lavarout se e c'hoarzhas kzeñv, gant ar blijedur.

- Peoc'h ! eme Alanig dezhañ, pe an sotrou Rusteval, koulskoude brasañ en e walc'h, a savo da zont dimp, ha ni a rafe un dro wenn.

Lom a chomas sioul. Bale a reas zoken ar skañvañ ma c'hallas war beg e dreid.

Lommat a rejont er porzh kloz dreist ar gloed serret. An noz e oa didrouz. Er porzh e oa ur mell pengos darv, faoutet en un tu, ha daou c'henn dir a zalc'he ar faout digor-bres.

- Paeron, eme Alanig, er faout-se ez eus muic'h a vel eget ne grad deoc'h. Plantit ho min a-barzh ken doue ha ma c'hallot. Nemet un all : arabat ober re gofad. Droug a rafe deoc'h.

- O filhor, eme Lom, kredif a ra deoc'h eo va genou brasoc'h eget va c'horf ? Nann, nann, n'eo ket. Me 'oar tailhañ va c'hoant hervez va ezhommoù. Lom eta a gredas Alanig. Lakaat a reas er faout e benn betek an diskouarn, hag e dreid-arsok betek an daou c'hlin. Alanig a grogas diouzh e du gant e labour, hag, hep gouzout dare d'ar c'hoppaer, e tennas an daou c'henn er-meez eus ar faout.

- Aiou ! eme Lom, o yudal gant ar boan en e benn hag en e dreid gwasket ha flaetret gant ar faout o soriñ warno.

- Petra 'c'hoarvez geneoc'h, paeron ? Grit peoc'h, pe an sotrou Rustevel a zegouezho dezhañ dihuniñ.

- O filhor, filhor karet, distardit ar faout, en anv Doue !

Komzob flour ar geneoueg n'o doa ket ar galloud da deneraat kalon vouzar Alanig.

Lom neuze, pa welas e oa bet graet goap outañ, a grogas ennañ ur fulor ruz. Diskrapet a reas gant e dreid a-drefiv, ha seul vui ma tiskrope, seul vuioe'h en doa droug, ha seul vuioe'h a kounnare, e c'harme hag e vallozhe. Kement a drouz a reas ma tihunas mest' an ti. Rustevel a lakaas e fri er prenestr :

- Piv 'zo aze ? emezhañ.

Den ne respontas anezhañ. Lom, avat, a gendalc'he da yudal ha da hopal. Rustevel a grogas en e vouc'hal hag a ziskennas er porzh.

Lom, pa glevas mouezh an den, a ziskrapas ar pezh a c'hellas. E groc'hen a oa hall entanet hag e gorf a oa glabiet gant c'hwuzenn an anken. Ne dalveze ket dezhañ ober bec'h. Kollat oa. Alanig ivez a gredas dezhañ e oa graet gant Lom. Setu eta, pa welas Rustevel o tant, ur vouc'hal lugernus en e zorn, a lavaras d'o goppaer :

- He Lom ! penaos emañ ar bad geneoc'h ? Livirit din 'ta ha mat eo ar mal. Goustadik, goustadik, arabat debrif re. Setu an sotrou Rustevel o tont da zegas deoc'h ur bannac'hig gwin da lakaat ar pred da ziskenn. An dre-se a reio kalz a vad deoc'h. N'eo ket gwiz, koppaer ?

Hag Alanig a gemeras hent Kastoll-al-Laer.

Rustevel, pa zegouezhas, a chomas souezhet. Un arz en e borzh ?

Hep soñjal e oa ses dezhañ reif taol ar marv d'al loen, redek a reas d'ar oetaleri da glask sikour.

- Hola, paotred ! deuit 'ta, ha buon ! un arz a zo paket e bovioù hag e benn e faout ar pengos ! Deuit ma vo lazhet.

Ar baotred a yeas gant Rustevel. Unan a gemeras ur forc'h houarn, unan all ur restell, un trede un tzañch. Hemañ a gemeras un horzh, hennazh ur gontell-lazhañ moc'h, ar marichal ur varzenn-houarn, ar c'here ur minkoued hir ha lemm, ha meur a blac'h he c'hrög-yod.

Lom, en e spontadenn, e sachas kement ha kement, ma c'hellas tennañ e benn hag e dreid eus ar faout. Siwazh dezhañ ! Glac'harus a oa e stad. Blev ha kroc'hen e benn, un hanter eus ur skouarn, hag e hall ivinoù e oa chomet er pengos ! Un drouz e oa gwelout anezhañ, gant ar gwad o redek puilh dreist e choug. A, nann, ne oa ket mat mel ar pengos derv ! C'hwiz-put e oa. Eval ar vestl.

Lom a glaskas tec'hout. Met kouezhañ a reas war e vin. E dreid a oa re gizidik evit reif sikour. Ar gouerien a zeuas d'ober dezhañ e stal. Tafva a reas fast ar vazh, fast ar forc'h, fast ar restell hag an horzh. Paotredigoù a zereas gant kauneudenoù, mob ar marichal a zic'haloupe gant un durkaz hag ar c'hemenar gant e vestr-koad pevarc'hornek, ken tev ha pevar biz-neud. Lom a oa bloñset e benn, e zivskoaz ha livenn e gain. Goude ur c'hard-eur a varzherinti a kouezhas war an douar, hag ec'h an em rentas da vezval.

- Graet eo gantañ ! a lavaras ar baotred.

Hag int kuit d'o zi gant o binvioù war o skoaz. Marc'hoazh d'ar beuze a teujent d'e ziskroc'henañ.

Lom ne oa ket marv. Ma oa kollat gantañ e holl anacoudegezh, a chome c'hoazh un tommig buhez en e gorf. Ma vije bet ur medisin er gêr, en dija sentet c'hoazh larmoüigoù dister en ur lakaat e skouarn war galon al loen. Goude bezañ chomet un abadenn vat war lauzenn ar porzh, ar paour kaezh loen mac'hagnet a zeuas anoued dezhañ. Ur skrijadenn a yeas dre e hall izili gant ar boan o tont en-dro. Lom a zigoras e zaoülagad duet ha koeñvat, hag en em ruzas, da vare ar pellgent, pell diouzh an dachenn villiget.

Alanig ne oa mui nec'het gant ar geneoueg. Mont a reas da spinañ ar yer war o c'hilud. Dont a reas e-benn da vezval gant e gomzoù flour ur bleuzig hanter-gousket war bod ur wazenn ivin, hag ar yerig disvezh a gouezhas etre poviñ an treitour. Mont a reas diouzhtu da zebriñ ar c'horfig tener a-drefiv kleuz ur warem. Edo da vat o lipet an askell diwezhañ, pa glevas trouz ar foz. Selc'ho a reas. An trouz a dostas. Alanig a oa praet d'ober ul lamm dreist ar c'hleuz pa anavezas ar paour kaezh Lom.

- A, c'hwi an hini eo ? Penaos eo tremenet an traoù du-hent ? N'oc'h ket evit en em stlejañ ken ? Ho korfad mel eo a vir ouzoc'h, ma 'zo sur. Deoust ho paet hoc'h eus ar mal laeret digant an sotrou Rustevel ? O, paeron, e pegeurt urzh oc'h nevez antreat, pa welan war ho penn ur galotenn ruz ? 'M eus mon, ar perukenner, en ur douzañ deoc'h ho plev an deus trouc'het ivez ho tivskouarn, hag un den didruze bennak en deus laeret kroc'hen ho tal hag ho tivjod evit ober ganto manegoù.

Lom a gava blaz fall gant ar goperezh-se. Hogen re sempl a oa ha re a c'houzafve, e kement korn eus e gorf, evit reif d'an treitour ar pradad an doa

gounazet. Gwelloc'h e kavas troñ keñ, hep lavarout ger. Diskenn a rese betek ar Yeun, hag eno e kouezhas, hanter-varv gant an droug, ar boan hag an dizesper, en ur foz leun a zour-mergl.

- Gwelloc'h e vije bet din bezañ lazhet gant Rustevel, a soñje ar paour knezh. - Ur vevj hir am eus c'hoazh d'ober, ha n'on ket evit chom war va zraid. Pa zegouezhin e palez ar roue, an holl a raio gomp ouzhin. Ul louarn a zo bet re ber din ! D ! mil mallozh ! Ma teuan c'hoazh da vezañ paze ur wech bennak, e anvo keuz e kalon al loen fall. Touñ a ren.

Pa zeuas ar goulou-deiz da sklerijennañ ar Yeun-Elez, Lom a savas hag a gemeres, en ur jilgemmañ, hent Kemper-Kourintin. Goude pever devezh-bals e welas o tarzhañ ar pellder touripù uhel an iliz-veur.

- A ! eme Lom, echu eo va hent poanüs, met n'eo ket echu va foanioù, ha mezh ha gomperezh am eus c'hoazh da c'houzañv.

Degouezhet oa er palez. Nobl, ar roue, o walout anezhañ un un doare ken iskis, a lavaras :

- Va Doue, daoust hag an arz feal, va gwellañ servijer, eo an hini a zo dirazomp ?

Lom a respontas :

- Ya, roue meur, Lom eo an hini a zo direzoc'h. Gwelit e pesurt sted truezus eo bet lakaet gant Alanig al Louarn, gwashañ judaz a zo er vro.

Nobl a yeas droug ennañ. Lavarout a rese :

- A ! A ! Alanig en deus klasket ! Kavout a raio, ha paest e vezo an trubard hervez al labour en deus graet, pa ne vezin envat ken roue al loened a Breizh-Izel.

Ha setu Nobl a gemenn d'e guzulierien, d'an archerien ha da vistri ar soudarded dont d'e balez. Displagañ a ra dezho trubarderezh du Alanig al Louarn.

- Petra a vezo graet ? eme Nobl. Pep hini a raio e ali, ha me, ar roue, a sento. Komzit.

Pep hini a savas hag a gomzas d'e dro. Hervez en holl e oa ret lavarout edarre da Alanig dont d'ar palez evit bezañ bernet pe kaout ar pardon eus e dorfed. Lom a oa bet kaset hag an doa graet un dro wann... Piv oar ?... Marteze Lom hag Alanig a oa enebourien douet, ha daou enebour eo diass o-walc'h dezho en em glevout. Gouzout a reomp ouzhpenn n'eo ket an arz ul loen spazdek ha dilu. Met a oa eta kas an taol-mañ ar finañ loen eus ar rouantelezh.

Lip-e-Bav, ar c'hazh finañ a oa e Kerfeunteun, ar skañvañ eus kizhier ar rouantelezh, hag an hini gwellañ marteze er bed holl da bakañ logod ar solieroù ha laboused al liorzhoù, a oa bet kerget da gas lizher ar roue da Kastell-al-Laer.

Nobl a c'hallvas Lip-e-Bav hag a lavaras dezhañ :

- Deoc'h da vont. Mar deo ur vevj risklus evit meur a hini, evidoc'h n'eo ket. C'hwil 'zo desket bres ha teodet-kaer. Gouzout a rit an tu da livañ ar wirionez hag ar gevier, hervez ma vez azhomm. Lavarit da Alanig dont diouzhtu d'ar palez. Ma teu, gwell a se evitañ. Ma ne zeu ket, gwazh a se ! Gouzout a ran ervat e soleas hoc'h alioù, hag a tevio d'al lezvarn.

Ar c'hazh a respontas :

- O roue, n'on ket ken sur-se da zegas anezhañ d'ho palez. Pennas en em gemerin, ur wech degouezhet e Kastell-al-Laer ? N'ouzon ket moarvat va-unan. Alanig a zo ken fin all ! Lom, an arz, a zo bres ha kreñv, hag en deus graet un dro wann, un dro ruz a vefe gwiroc'h. Pennas eta, ma, ur c'hazh bihan ha distez, e c'hellin ober ar pezh ma rese ket poutred ompart ? O roue, kredif a ren a vefe gwelloc'h kas unan all.

- Nann, nann, eme ar roue, c'hwil an hini a yalc, rak en ho korf bihan e kavan ar vrasañ fuznezh.

Ar c'hazh a lavaras :

- Ho polontez bezet graet !

Hag e kemeras hent Menez Sant Mikael.

SKRAPADEG AVALOU TRECUGI

War an abardseiz : smañ taolioù an anjelus o paouez kouezhañ diouzh tour an iliz. Ar maged e droidell goustad a-us d'an taennoù mein glaz. Mare kom eo.

Factedigoù ha krenn-bactred Rozig-ar-mager a zo arzet, evel kustum, war an tirienn dinden boc'hedig gwez evlec'h an Dourig-kozh, en tu all d'ar foenneg.

Pap hini a zo gantañ, etre pennoù e zaoulin, ur mell skudellad soubenn ar rouz. C'hwez'h, nev, unnek, trizek vloaz, berr hag hir, tev ha treut evel n'emsaint, frioù mec'hi ar Rozig a zo tammoù gwazed bihan anezho. Toull eo elien o bragoù war o fenn a-drañv, sec'hañ a reont stav o fri gant o mañch, met gwazed bihan int. N'o deus ket don rak o skeud ha kalonek ez e o soubenn ganto war drañv, ognon hag all.

Diakennet eo an heol, n'eus ket ur gosbrenn en cehi ruz-ruz; c'hwez vat, ne lavaran ket, e-giz c'hwez mel, ur frond flour d'ar fronell, hag e laka dour da zont e-barzh ar genou.

- Me 'ghev c'hwez avaloù.

- Me ivez. Diouzh Treougi e teu...

- Oi ! Me 'z afe ganin meur a hini war-lerc'h ur banne soubenn vat evel houmañ.

- Na ganin 'ta ! Ha ma'z efemp da Drecugi !...

*

Tudoù kaezh ! Ne vos ket seizhdaletoc'h ar soubennoù o tiskenn. Tapet e vos ar paz gant daou pa dri, ken bres o doa lakaet al loaidoù en o dremmoù. Prim ar skudilli d'ar ger, prim ar sec'h diouzh an ermel, pe ur mouchoùer bres, pe ur pennad kordenñig voan da droñv en dro d'an dergreiz. N'eo ket evit mirout ouzh ar brageier da gouezhañ, evit diwall an avaloù e-barzh ar grubuilhoù, ne lavaran ket.

.... Ha prim ha prim smañ erru ar boated adarre dinden evlec'hennoù bras an Dourig kozh.

O anvioù ?... Blev-Gwenn, brasañ galouper noz a anavezis morse, set da vertolod abaoe ha bet e-pad bloavezhioù o kantron e broioù ar C'hinobed; Morvan-Togn; C'hwez-Vat ha Lili Tal-brizhoù, lesanvioù anat deoc'h; ar Brenn, ur masiked, ur vouezh dezhañ e-giz d'un sostig, hogen laer e-giz ur c'hazh; Per Lallec'h,

merket dour e jed gant ur gleizenn, abaoe ma oa kouzhet en traoñ diouzh ur wezenn bin Al Lubi, Kefoleg, va c'henderv, ha me; ar Garz, paotr ar "vilioù"; Bolzer, ar c'hakouz; ar 'Iouig, erebour ar re birvidik a viaknoz, nemet lezirek touet; ha neuze an Dag, an Dag paotr e vrac'h fall, an Dag "brac'h-yod" evel ma lavaromp. Ur vantiennad ac'hanomp, peadra da skarzhañ koment liorzhad avaloù a vleurie e bro venniget ar Vigoudenned.

Ar C'holumb kozh n'oa ket muioc'h a vall war e vertolodad da dizhout an Inizi, eget warnomp da vont d'an arigrap da Drecugi. Gortoz a rejomp an defvalijenn e-pad ur reuziad emser. Dizeñjerueoc'h eo mont dezhi dinden askell an noz. Padal loargenn e oa an nozvezh-se. Skiaer ar maeziñ evel e-kreiz an deiz !

Met evelato ! hag ar boated en hentoù, ur safar d'o heul, gouest da zi-vouzerañ ur c'hloc'h, penn-da-benn hent bres Fornaleg.

Lavarat em aus deoc'h n'oa ket don rak o skeud. Mont a reont e-bieu da barkeier moredet e skleur al loaz, da bennoù-tiez serret kloz, da zrouz goad dour, ma ne gradent ket re sellout e-barzh, ken tefval e sant. Ha setu Treougi. Peoc'h raktal. 'z maner a zo ouzh e goadoù, ahont, evel ur vozer du uhel, savet e-dreuz an hent. Sioul eo pep tra en-dro dimp.

Ar grill-douar, ar raden sec'h, ar mouar du war an drez hag ar gwaz pin a zo kousket dinac'h o c'houstiañ, evel m'eo kousket kement den onest, set skuizh gant e labour pemdeziek. Hogen ni n'omp ket skuizh; hag onest ?... Feiz ! Va Doue !.. Sevel e viz an neb ne reas ket ar pec'hed !...

Prennet e veg gant pep hini; trouz abet war ar maez, nemet, e-wechoù du-hant, ur c'hi bennak o harzhal ouzh al loaz.

Lamet a re ar boated dreist ur c'hleuz; treuzif a reont ur c'houblad perkeier, ha goude ur c'haed gwaz pin. E traoñ ar c'hond ha gwaskedet gantañ, ur stivell hag ur faunteun gozh. Ur stivell, gant melloù mein karrezek tro-dro, ma teu ar merc'hed da bradañ o c'houz en deiz; ur faunteun darempredet a-v.-a. kozh gant ar c'halouperien e oa ac'hanomp. Meur a wech hor boa kavet gres dont da derrif hor sec'hed en he dour sklaer, p'edomp ar skol louarn.

Al loaz a linte ha c'hann, e-kreiz ar stivell, kar aplann hag en malezour.

En em vodañ 'reus ar boated en-dro d'ar Morvan-Togn, ur skrifellek hir war e zivesker, ojet a bemzek vloaz. Dibabet e oa bet da vestr ganimp, ha reizf a ree e urzhioù evel ur gwi rener. Komz a ree war e bouez hag a vouezh izel, en ur dreñf e benn e-zhou hag a-gleiz.

- Tri c'hant metr ac'halan smañ al liorzh avaloù, paotred ! N'eo ket dav en em lakaat droch evit diskouez n'hon eus ket don. Taclomp avazh eta paotred !

Gwall dud eo re ar menez. An hini a choma da stlejañ e boko un tenn fuzul ker bunn ha tra. Gant grouan holen ouzhpenn... Learezh avaloù Treougi ? Kouls learezh ul leus diouzhtu e kroue va menez Chenn.

- De voereb Chenn n'he deus leus abet !

- Ne lavaren ket ivez..., leus da-unan ! Met pootred ma n'ho'h eus ket c'hoant kaout dent ar chas e strad ha pragoù hag e kig ha feskennoù, evel just; ma ne blij ket deoc'h ar skourjez war ha tivskoaz; ma ne fall ket deoc'h chom stag ouzh ur wezenn e-pad an noz, serrit ho kenou, lakeit voulouz en-dro d'ho troid, hag hastit bunn.

- Sell 'ta ! 'm eus son en deus hemañ son ! Kerzh d'ar gêr neuze, Togn !

- Aon ! zo peoc'h d'am penn. Ma 'm eus skiant-prenañ, ma, ma ne fogann ket evel-dout. Hag un all mat a zo mat da gnout, dreist-hell evit ur genaroueg egizdout. C'hoant avaloù am eus kement ha te, ha c'hoant mont da gousket em gwela 'm eus ivez, hep tannoù holen pe skilfoù chas e-barzh va feskennoù... Hag evit ee eo a laverin dit serrit da veg ha sentit ouzhin. Me eo ar mestr ha me 'lavar eo poent bras stagañ ouzh al labour...

Ha kuit hon ebastel, astennet ganto o gouzoug, koutig-koutig, e-dreuz ar c'head pin, penn-da-benn ar c'hleuziadennoù strouz. Ul lamm e-dreuz hent bras Pormleg, un had kleuziadennoù adarre. Setu liorz ar menez.

Ur c'harzh uhel tro-war-dro, gant radenn hiz, ha spenn ha strouezh ha tarzgeoù derv. Ha ni o tic'houzougeñ dre ar riboullou, diwar gorre ar c'hleuz, e-barzh al liorz. Difiv an noz, moredet ar gwez avaloù. N'eus ket ur bouchad evel en onbl. Ar gwez, sklerijennet klok gant al loar, a zo stouet o skourroù betek an douar. Pet ez eus anezho ? Duk, ugent, tri-ugent, ouzhpenn kant, o renkennadoù ingal. Kristenien geizh ! nag o avaloù, nag a avaloù, skoachet flourik e-touez an delioù !.. Keuz am eus da vezañ degaset ganin ur sec'h re vihen.

- Ac'hanta ! mont a reomp ? a c'houlenn ar Blev-Gwenn, a zindon ur vodenn lenn.

- Ye ! Ye ! a dable ar Morvan Togn. Te, Bolzer, kerzh da ober ged, du-hont, a-dreñv puñs ar verouzi. Ma klevet trouz, ur c'hwitelladenn !... Kompren a rimp. Ni en em denno pep hini diouzh e du, d'an em gavout en-dro d'ar stivell evit lodañ an avaloù. Komprenet eo, pootred ?

Gleb glizh eo ar gant; petra vern ? C'hoarzhed ha pijs gant invagnoned Rozig-ar-Mager, o vont e-dreuz al liorz e-giz kizhier, war balvoud o dnozm ha war o Tennou daoulin. Dapu du-mañ, tri du-ze, en em silañ 'reont e-barzh tevelijenn du-pod ar gwez. Dizale o voe al liorz adarre evel ma ne vije ket bet un ene onni.

Aet e oa ar Gerc'heiz - me, mar kavit gwelloc'h, - gant ar C'hefaleg, e

geñderv d'ur wezennad avaloù skildrenk, anavezet mat ganto. Kinnig o ree ar skourroù terrif gant emm ar frouezh, melloù avaloù mirzin ha melonek, tud peour ! azv, ur c'hwez vat d'eo heul, pendra da lakeat dour deoc'h an ho kenou e-pad pevar bleaz. Kement e oa, ma no ouien dre be du stagañ ganti. Senkañ 'ris va dent en unan, ha bec'h dezhi ! Ur sac'hig bihan divalev am bos degaset ganin, avat ! Laun a voe kerkent. Hag amzer am eus ivez da gargañ va grubuilh ? Ur sell arsek e-barzh al liorz : goullc eo atav e-giz ur vered. 'M eus son e tarnij huannoù zoken. Anson ? Aval ? Ye-da ! C'hoarzhadennoù mouget, na lavaren ket.

- Tarzhañ a ray pootred ar Rozig gant an avi ! a voe klavet.

Skañvañ a ree ar skourroù. Laouen e oa hal lakepedet. Podal, evel un taol kurun e-kreiz bodadeg konikled ar warrenn, e skiltr ur c'harn :

- Kes warnomp ! hou ! hou ! hou !..

Dispourballet e zaoulagad, dilammet a oa ar gedour al liorz en ur hopal, hag e tifrete, hag e fuste, trouzif a reas al liorz evel un tenn. E-giz ul loen sot. Strofuilh ! ha youc'h ! ha tec'h timet war-du ar c'hond pin. Bras ha bihan, tev ha treut, sachañ a ree pep hini a gilhozou, ha dilla !

Amzer dastum va soc'hadig avaloù, ha ma ha senkañ tizh eun davet ar c'harzh dostañ. Ne santia ket allazig an drain-spenn, ma respont deoc'h. Trouc'hat e oa va onal.

Edo ar gward al liorz, ur penn-bazh spontus en e zorn. Aïou ! kein unan bennak. Gant ma ne vo ket va hini. Ha ne vo ket ! Diwar ar c'hleuz, houp ! ul lamm... e-barzh an dour ! Gwashañ c'hoazh ! Stagañ a ree al lec'hid, lamm a oa an alestr. Bourbouilhet a ree an dour-chag; ha ma e oa karget va botoù ha glabiet va bragoù...

Eman er-maez, avat. Un toull en aval, ha ma zadak, ha radek, ma ouien ober. A-benn ez is ar gwez pin hag ur maen bennak. Hogen n'am bija ket zeuet buanoc'h ma vije bet an tan em fenn-adreñv.

Setu ar stivell. Den abet ! Trouz abet ! Sell ! Ma 'zo ar c'hontañ. Eo ! emañ arrou ar gedour. Sakre Bolzer ! A-benn ma c'hall kaout a onal, hañ ivez ! N'eo ket diskoalfet c'hoazh.

Diouzhtu war e lerc'h a tagouezh ar Meoutig, ur roued da vont d'ar marc'had gantañ war e skoaz, ha goude ar Blev-Gwenn. Hemañ, evit bezañ skañvoc'h, a oa bet atlepet e avaloù gantañ war an hent. Kavout a reas an narzh, evelato, da folliñ :

- Chouk ma'z out ! emezañ d'ar Bolzer. Hag e oa dav dit hopal e-giz-ee ? Diblaaset eo va c'halon...

Ar C'hefaleg, al Lubi, al Lestr-Rouz, Morvan-Togn a zired, an ail war-lerc'h egile, o c'hoarzhin gles an darzvuiañ enszho; pep hini, avat, o tiskargañ,

ar bern, samm e avaloù, ur blijadur. Evit ober al lodoù, ne c'hortozer mui nemeñ an Dag.

- Pelec'h eo chomet adarre an Hini-Brec'h-Yod ? a c'houlennas ar mestr.

- Ar strollag-se a vo bet tapet gant an den, eme ar Brenn, paotr an iliz.

- Tapet ? Houmañ a vefe unan neuze. Deuomp da welout.

Ur gwiskad raden da guzhet ar bern avaloù, ha kuit ar baotred, dre ar c'hoed tefval adarre, da welout pelec'h e oa chomet an Dag.

Allas ! Douet oa ar wirionez gant ar c'hurust. Ret anezv edo ar Brenn finoc'h eget kaoc'h louarn. An hini finañ...

Paket e oa bet an Dag. Ha fest ar vazh en e enor ! Tamolodet a-drañv ar c'hleuniad strouezh, ni a wel, ni e glev.

Gward menez Treougi, imor ruz an e gof, a heje e benn-bazh, ur pikol penn-bazh, gant un dorn; gant an dorn all e sache war skouarn an Dag, hag e vofes ar paotr paour :

- Ha ! Tres-kroug ! Ha ! Laer ha mab laer ! Me da bako-me, koll-boued, fall-tra, lor-frañs, penn-tach !... Dont da leerezh va avaloù-me ? Evit da c'hopr, un teol fuzul e-kreiz da zaoulagad, mab an diaoul, un teol fuzul, bremaik... Alo ! d'ar menez !...

Ar paour-kaezh Dag a oa gwisket liv ar marv war e zremm, nemet ur skouarn ruz-tan an tamm anezhi... Ken sabadac'het, avat, ken korilh a oa e dres, ma taolas unan :

- Dag, na gac'h ket ez pragoù, Dag !

Ma tirollas an holl gleuziad da c'hoarzhin krefv.

Sebez krenn ar gward. Diskregiñ a ra diouzh brec'h e brizoniad; sailhañ 'ra davet ar c'hleuz; sellout a ra. N'oa tro-dro, na ki na kristen. Ewel just. Rak difretet e oa kuit hol lamponed, ha buan, ha didrouz, dindan goudor du-dell ar gwaz-pin.

Kounnar bras er gward. Ewel just ivez. Aes an dra da gompren. Diskenn a reas diwar e gleuz, o krozal :

- Paeañ a ray egile an holl...met !...met !

Egile, ewel just atav, n'oa ket chomet da c'hortoz. Amzar dastum pemp pe c'hwec'h ewel war al leton, kement-se atav, tec'het e oa kuit an Dag.

Setu m'eo degouezhet e-tal ar faunteun, a-benn ez fin, glas e veg, trouc'het a anal. Goap a reer outañ :

- Plijadur ac'h ouz bet, Dag ? Pelec'h out abaoe, Dag ?

- Va brec'h an hini eo.

- Redek a rez gant da vrec'h, te ?

- Nann ! Nemet krog e oa an den am brec'h. N'oa ket evit tec'hout !

Holl emañ gwitibunan, an-dro d'ar bern avaloù, re zous anezho, re crenk, pe skildrenk, re c'hwerv, ezv ha glas mask-ha-mask, - an avaloù, n'eo ket ni !

Rennet eo ar bern, kement-ha-kement da bep hini. An Dag - o gounezet en doa - a voe roet dezhañ, evit e lod, ar bravañ avaloù hag ar re wakañ.

Mont a reomp, goude-se, da dapout an hent bras. Ha dre ar gozeli e tistroomp da Bont-'n-Abad, en ur vale d'ar paz, ewel soudarded, en ur youn'hal son avaloù Treougi.

Ez an d'e ganañ deoc'h.

- Ha kradiñ a ra dit eo dav-dav ?

- Mat-tre ! Mat-tre !... Neuze, noz eo anezhi; poent eo mont da gousket. Kenavo ur wech all.

MILIN KERBOURNEG

E-tal bourc'h Sant-Pez-Kiberen, ha pa lezer iliz ar barrez evit monet da Veg Roc'hu, e weled c'hoazh, pa oan krouadur, ur vilin gozh emesk ur veineg a ziskenn betek ar mor. Gwechall e yas dindan an dour, pa'z eo gwir ez eus bet kavet meinhir e lec'hid al Lezoù en em led dirak an aod. Bremañ, mar deo etev ar veineg en e sov, emañ divuhez ar vilin-avel ha kempennet diherak gent diavaezezion smoot. Pa oa gloev c'hoazh tier an "dudjentil" en-dro dezhañ, e oa brav an techad-mañ, gent ar vilin o treiñ, gouarnet a bep tu gent tolp mut ar meinhir.

Ur blijadur a veze evit ar vugale monet da welet ar vilin ha deleziou hec'h eskell hag a seblante bout pikol rastelloù koat. Pignet ouzh ar skaul-se, daoust da c'hourdrouz ar miliner, setu ur c'hoari eus an dibab evit goupined⁽¹⁾ daouzek vloaz.

Diouzh un tu all ur misi⁽²⁾ a veze ar meinhir evit c'hoari brezel, c'hoari kuzh ha razh ! Ne deo ket neozh abalamour d'ar plijadurind-se en doa gouarnet⁽³⁾ Herri, eus al lec'h-mañ, ur soñj n'ankounac'hafe mui biken. Mar deo chomet ker bev en e sfvor, emañ en arbenn eus ar pezh a zegouzhas gentañ ur wech ma oa daot da c'hoari d'an tu-se, gent bugale hanvet Leon, Lizig ha Madalen.

Leon ha Lizig a oa breur ha c'hoar, rust ar paotr, fin ar plac'h, met kriz evel ul louarn. Lakest ar re all da c'houzefv a oa he plijadur vrasañ.

Hufvreur evel ma oa Herri, ne c'helle ket bout mignon bres da vugale a saurt gent Leon ha Lizig. Bourrañ a rae-heñ soñjal, en e unan, war an aod, daoust da c'hoaperzh ha daoust da droioù kamm an daou c'hwil arall. Ret e oa dezhañ neozh darc'hel d'o dazempredañ, abalamour da vignoniez e garent gent o re. Ha pa c'hwitelle en avel e geot druz an tevenn, pa gene e-dreuz ha demariad al liorz, ne gleve ket Leon na Lizig ar pezh a vane a ene. Penaos neuze bout komprenet ganto ? Penaos a c'hell an bevelap bro bout ken nelavar svit lod ha ker mut evit lod all ?

Plijadur Herri a oa chom pall diouto, o redak eus ar mor gouez betek an ouf dihouenn, a-hed ivarc'hoù troiellus ar c'hourenez, en ur selaou ouzh mouezhiad dous e faltazi.

E Porzh-Gwenn, e Porzh-Bara, e Porzh-Boulom, lec'h ma tarzh anal ar mor gouez, e don aberioù grek bihan, etre tevennoù a-blom, e chome alies da welet an unved-mor o treiñ, dreist enonn ar chal, ha tud ar vro o vuzhine. E koadoù Punteur e vourre kantreal ha klavet goulvan ar gwez e-pad euriadoù hir, evel dason sonerezh ur bed all.

(1) krennaded.- (2) un drugar.- (3) miret.-

Madalen na oa ket eus ar vro, hag hi anavezet gentañ a-werso, Bihanik, ez oant bet war un dro e Pariz hag a-c'houde an amzer-hont ez oant chomet mignoned bres. Koant a oa Madalen, ur fas splann ha moan dezhi, gent dcoulagad du-voulouz. Evit ur paotr douget d'an hufvire evel ma oa Herri, hag a sante dija bam ar gened, e oa chomet skoudenn Madalen evel hini karetañ o galon. Hañval e oa dezhañ ez oant graet o-daou a-viskoazh gent an Aotrou Douc evit en em unañ, evel a-barzh an istor-se en doa lennet alies.

Goude bloavezhioù disparti, ez oa bet kouviat Madalen hag he zud da dremen ur miziad e ti Herri hag e-pad sizhuniou, an doa hufvret gwail eget biskoazh o soñjal e mignonez koant o galon.

Un devezh a viz Gourhulan⁽¹⁾ oc'h ezruas ar vro, koantoc'h c'hoazh eget n'an doa he graet e faltazi. Dija ez oa ur plac'h yaouank, ur veuez warc'hoazh. He setu ar garantez krouadur o vleunañ a-nevez !

Siwazh ! ne deo ket etev an ebeù ker brav hag ar c'horfoù. Madalen, speredet hag amiabl⁽²⁾, ne oa ket douget, evel Herri, d'an traoù a vage e hufvire-heñ. Gent Leon ha Lizig ez oa bemez da c'hoari gent ar vrasañ plijadur, daoust dezhi bout ken dous ha ma'z oant int rust ha divalav⁽³⁾. Setu Herri, klouhanek⁽⁴⁾ oc'h anavez a-nebudiou ez oa mignoniezh ar re all war greskiñ evel pa vefe bet bravoc'h, allas ! e hufvreoù eget ar wirionez.

Chom a rae Madalen neozh karantezus a-kefver he mignon, daoust da erdoù an daou c'hwil all ha biskoazh n'he doa c'hoazh hauliet skouer o fallentez, pa voe ret d'an holl monet war un dro, un endervezh, da Gerbourneg, lec'h ma chome mignoned o zud.

Devezh e dorr-kalon hag a c'hlec'har ! Devezh e fallentez hag e driseoni ! Daoust da zoueter un amzer vrizh a lakas war ar mor evel ur melzour argant, daoust da glemoù melkonius ar vilin, daoust da livioù ar bokedoù war ar geot, etre steudoù ar meinhir, kriec'h-kriz o deus kroget Leon ha Lizig gent o gouperezh, ha setu Madalen, evit ar wech kentañ, o sevel a-du ganto enep da Herri ! Setu ma c'hoarzh, hep kalon na truez, evel an ebeourien m'emañ be' ar re all a-werso ! Setu ma nac'h he mignoniezh, setu ma flastr he c'harantez ! Ha Lizig, an naeruz, a zistag evit achuiñ gent mousc'hoarzh ar gesoni trac'hus :

- Penn smoot ! Kredif a rae c'hoazh ez oa Madalen ouzh da garout. Tamn ebet, evel ma welez hiziv ! A-du ganemp emañ a-c'houde an daiz kentañ hag a-du ganemp a vo bepred !

Ret e oa bet chom e-pad an endervezh hir a-bezh, e-touez an amprevaned-mañ, a-tal an dreitourz a oa karet c'hoazh tener e don kalon c'hwerv Herri. Ret e oa bet darc'hel d'ar c'hoari dirak ar vugale all a oa emañ, dirak daoulegad ar re vras ! Ret e oa bet tevel ha gouzav, damdegst e anal gent an doñjer hag ar glec'har.

(1) Gouere.- (2) kardek.- (3) fellekr.- (4) trist.-

Un nebeut dovezhioù war-lerc'h ez eas Madalen hag he zud kuit evit distreiñ d'o bro. Daoust d'ar c'hoant krefv en doa da gevout ar re tenarded ur vignoniñzh gronnet a-wezao gant kement a hufvro, e c'hellas Herri chom hep lavaret kenavo dezhi, dirak an tref o vonet kuit...

Droukrafis didalvez, peogwir ne oa roget gant an disparti nemet kalon an hini mut !

(Dihunamb, Eost 1943. - Sell. Istor..., p.159)

URIEN AR REDER

Ar pezh a c'hoarvezas da Urien ar reder, un dra souezhus ha dises da gontañ :

Seure a oa. Gwenn ar bed an brumonn danav an diskor-amzer, pa'z eas Urien er-maez aus a di. Chom a reas ur pennad oc'h arvestiñ en draonienn gwisket kann. C'hweas 'reus glebor fresk ar mintin; hag e-kreiz e vruched, betek daon e galon, e sentas en un doare iskis evel eskell d'e ene. Ha neuze e glaeuiar biroù herpet ouzh e zargreiz, e werug en e zorn d'hou e redas Urien a lemmod, evel un denn, betek lein an dorgenn, da c'houzout war pa du a trofe an deiz-se kantren e gammedo...

Nemet neuze e welas o sevel betek ennañ en un tuz mibin, un den. Un den dianav !

Tostaat a rae hag e welas sklaeroc'h anezhañ : blevat hir ha melen e oa, gwisket en un donag verr o tiskenn betek a-us d'e zaoulin. Klauouez ebat buzh e c'houzout, na gwaraeg ebat en e zorn.

Pignat a reas war ar gribell, ha chom a-sav :

- Ha n'eo ket te, Urien ar Chasseer, anezhañ, gwellañ reder ar vro ? Setu ma taolan hiziv klaouestre dit : n'out ket evidon-me.

- Gouzout a rez moarvat, ene Urien, n'hellan ket nac'hañ klaouestre taolet din. Daoust n'ouzout ket piv out-te, deomp eta war rask.

Kerkent e oa tec'het an den dianav a-herr, o skeiñ war-du ar werum vres. Urien war e heul a glasku tostaat, met seul primoc'h ma rede, seul asoc'h e seblante egile lammat ha pellaat, evel pa vije bet ar redok ur c'hoari evitañ. Goude strivañ ne c'houzeze tamm. Keit-all e chome bepred.

An den dianav n'en devoa na gwaraeg na biroù. Urien a soñjas e oa so marteze a samme anezhañ. O disteurel a reas dioutañ. Met an aner e voe. Keit-all e oa bepred egile...

Ha setu un eurvezh, diw eurvezh ma redent. Ne skuizhe ket an den.

Savet e oa an heol, un heol marlivet a ziskar-amzer, a sklarie bremañ d'e zaoulagad ar vro doaniusañ an dije gwelet biskoazh. Ur vro meinok ha trist-divi. An dud enni, evel relegoù kroc'hanet; spontus ar okleur a luc'he an toullou klouz o deoulagad. Met ar spontusañ holl an o doare a oa e c'hoarzhedoù : pa

zigrent o genou ledan-ledan, gant stlakadeg o dent, e oa goap da dresañfañ ur galon lemmoc'h ha donoc'h eget ur bir, e oa goap da zisuc'haf un den. Kentoc'h eget c'hoarzh e oa harzhadennoù chas praet da zañfañ. Urien an em sante o koll kalon. Hogen, ret e oa mont, mont betek ar punn, lec'h ma plijfe d'egile e vlainañ. Pelec'h ? N'ouia ket. Ret e oa mont, peogwir an devoa dugemeret ar c'hlecustre.

Diskenn a reas an heol, ha redek a raent bepred. Didud e oa bremañ ar vro veinok, met sorsoc'h ar menezioù. Skuizh e teus Urien da vozañ, berr e enal; hag egile pelloc'h-pellañ e oa bepred ken skafv e droad. A-vec'h ma c'halle bremañ Urien gwelout anezhañ eus a-bell, pe dros an den un ur c'horn pe goin eus an ode da vont da guzhat adarre a-drefv ar c'harreg. Nemet evit e vroudañ e taole dezhañ hopadennoù, hppadennoù, hopadennoù fromus, a Zregernu iskis ar menezioù.

Hag a santas Urien en e galon evel ur pouez, evel pouez e garantezioù-en, ar soñj d'e di, an dement d'e vrud, ar c'hoent d'an douerel. Marteze e oa se a harze outañ a skafvaet. Ha kemer a reas kement a oa eus soñjoù e galon den d'o skarzhañ kuit ur-maez, d'o zeurel pell dicutañ. Ya, distrobc'h a oa bremañ adnurzhusaet.

Nozif a rae. Hag el loar a saev en nebl, o sklerraat an hent. Kompasoc'h e teue ar vro da vezaf...

Mat etav an den dianev a rede, etav ken teer e droad, etav ken skiltrus o hopadennoù an noz sioul ne gleva ken Urien nemet ha trouz e anal-af,skuizh evel trouz bejinoù ur c'hovel.

E benn a oa deut da vezaf ponnez, evel pa vije bet plomm anezhañ :preds- ha predex a save ennañ, diasesc'h diasesc'h o dougen. Perak en devoa evels degemeret ar c'hlaouezre ? N'en divije kollet netra eus e vrud o chon en e veuriad, ha goude bezañ nac'het mont, peogwir ne oa ket an den eus ar vro ! Distak pelec'h e vefe blianiat bremañ gant an estren-se ? Santout a rae e save tam-tam an arvar d'e veuzif ha da wanaat kement narzh a vanu c'hoazh ennañ... Pa vinnas a-benn ar fin stlepel kuit diouz e soñj an holl breder-se, kement a oa eus pouez e speread, betek ar pap karetañ, betek ar "me" moumounet-se ken etag outañ ha mel an eskern. E ziskargañ a reas gant ar peurrest.

Ha setu ef skafvaet adarre da adkrogif gant an heuliedenn.

An noz e dramone, al loar a oa set da guzh, pep tra en em golle en em-c'houlou. Moarvat praetik e terfe tarzh an deiz...

Met trouz ebet ken, na flapadenn troad ebet ken, nag hopadenn ebet ken.

Mut an den, mut an noz, mut...

Kollet en devoa; tec'het e oa egile da bell. Urien a gouzhas divi, hanter varv.

Freskter ar beure e zihunas : an deiz e zigore sioul, tener ha break evel ur rozenn siwenn.

Ha kentañ tra a welas Urien eo kement-mañ : an den dianev a oa an e gichen. Aze oa deoulinet war al leton, ha gant beg e vizied e flours skufv e vlev dezhañ harpet e benn ouzh e varlenn.

- Ha kousket mat ac'h eus, keneil, eme an den. Diskuizh out bremañ ? Ur reder kalonek out-te.

Ha war an toel e komprenas Urien an devoa kollet ha gonezet war un dro, kollet ar redadenn, mat gonezet ur mignon. Ha, fromet-holl, e savas e kanndar ar beure hag e kanas :

Goude glac'har an noz
Fegen c'hwek ar beure;
War vrennid ur c'heneil
Eo frond ur rozenn vlin.

Gouzout a raen ervat
Ne oas ket touellur
Ha pe seblanten koll
E oa din da c'honit.

Keneil, hiviziken
Digor din da galon :
Goude striv ar redek,
Surzhudusat diakuizh !

Hag an den da c'houlenn :

- Anavezout a rez c'hoazh ar vro-mañ ?

- Ya, emezañ, va bro-me ez eo, ha koulskoude ha gwelout a ran 'vel pe vefe pep tra navez anni. Adnauziet e hafval din kement a zo eus ar bad a-wechall.

- Diwar da redek hir eo deuet an dra-se dit. Rak n'eo ket hopken kement a zo eus ar gorre a wali bremañ, mat gallout a ri lenn an ene pep tra, ha klevout ken diabarzh pep tra, pe vat pe fall, pe drist pe leouen, ha gouzout dibab an o zouez kement a zo c'hwekter gwizion ha levenez. So eo da c'hopr evit da redadenn.

Aet e oant war-raok, hag a-dreuz ur c'hoad a pignent bremañ. Hiboud un eezenn er gwez a sourre evel son violoñsoù skilintin o c'herdin. An dail dindan o zroid, delioù rous an disker-amzer a lavere da galon Urien splann-derioù al labour kaset da benn hag hirnezh ar c'huzh-heol davet an inizi.

Goude ar c'hoad en em ziguzhas punn ur menez, ha warnañ ur c'hastell evel kollet e lein en oablou.

- Ar menez-se a anavezan kaer, eme Urien, met penaos ar c'hastell a verzan bremañ war e gribenn ?

- Va zi eo, eme an den. Eno edon a-viskoazh ha ne wales ket ac'hanon. Me 'ziskanne da dremen ouzh da dor, ha n'am gweles ket. Da c'harvol a rason, ha ne gleves ket. Ne eo an den dianavez.

- A kenail ! Hag en 'vin c'hoazh digar a-walc'h evit chom hep da welout pa drumeni, hep da glevout pa c'halvi, hep da gompren pa gomzi ? Goude da gavout em eus aon d'az koll.

- N'az pezh ket aon. En em lez hepken da vezaf blienist ganin lec'h a garin. Deus ha gwel !

Antron a rejont er c'hastell. Hag e tiskouezas an den e dezorioù dezhañ : kurunennoù, mantilli, perlez, skrinou leun a vein prizius.

- Ha ne walez netra souezhus enno, emezaf da Urien ?

- Gwelan, a respontas hemañ. Kement am eus diskaret diouzhin war hent ar redek a zo amañ en-dro. Maen-rubis va c'hoantadoù, maen-topazo va frederioù, ha va "me", diamanet treluc'hus.

- Ha kollat e vefe tra pe dra eus ar pezh ac'h eus dilc'zet evidon ?

- Netra !

- Evelse, kement striv a ri d'am servijout, Urien, ne vo kollat nag evidon nag evidout.

- O kenail, eme Urien, n'em eus ken c'hoant nemet d'ober eus da soñj va soñj-me, eus da breder va fredor-me. Ha chom ez ti hivizikan a vezo din rii levenez.

- Siwazh, Urien, mar am c'haraz e tistroi davet an dud adarre. Hag em anv a leveri dezho pezh a ouzout. Kontañ a ri dezho da redadenn vuzhodus ha sellet e vi ganto evel un den kollet gantañ e skiant-vat. Dougen a ri diwaskell kuzh, diwaskell leden d'az ene ha n'o gwelint ket, da c'houliañ a raint o stekiñ ouzhit gant o c'hrabanou ha ne ouzint ket. Poanuis e vo dit, met frenluz war un dro, rak oc'h ober evelse e splanno annout karentez er Vuhez. Ganit e vin, hag evit da gorf bezañ pell diouzh ar c'hastell e vo bepred da galon o chom annañ betek an deiz ma savi en-dro betek amañ da dafva leunder ar peoc'h.

Urien a ziskennas eus ar menez. Ha c'hoarvezout a rae gantañ evel m'en devoa lavaret ar C'heneil. Kontañ 'rae burzhud e redadenn, ha nebut a dud a grade. Skilfet e oa gant o diskredoni. Met diwar karentez evit ar C'heneil e c'houzefve gant levenez, o c'houzout mat e tastume Mestr ar C'hastell en o zefzorioù kement strived a rae.

Ha d'en noz o kane :

Eus kraban al leon, va dieub,
A kenail ar C'hastell lugernus !
Manel ez ti, c'hoantad draist-hini.

Rak emae va c'halon eo kounat
Kevrinoù ar redek burzhodus :
Levenez, anavout da vezafa.

Ha trivli va c'halon eo c'hwasa
Da frondoù an kreizon va ene
Ha klevout da lavar disheglev.

Deus buan, o serr-noz diwezhañ,
War labour va buhez sevenet,
Ra gano delioù rous ar c'hoadoù.

Hag er gwez e sourro un hiboud
Evel mouezh esmaüs ur rebod
A vije lugernus e sonioù.

Pantekoet 1945

(Kevrinoù Kristian, niv. 5-6, 1948)